

An Aviel santel hervez Lukaz

Troidigezh dindan renerezh Maodez Glanndour

PENKERMIN

2020

1 Kinnigadur.

¹ Ha goude ma'z eus bet kalz o deus klasket urzhiañ un danevell eus an darvoudoù bet kaset da benn en hon touez, ² hervez m' o deus degaset dimp ar re a zo bet testoù diwar-wel, adal ar penn-kentañ, hag a zo deuet da vezañ servijerien ar Gomz; ³ me ivez am eus kavet mat, goude ober un enklask pervezh war an holl draoù adalek an deroù, o renkañ hag o skrivañ dit, Teofiloz enorus-meurbet, ⁴ ma'z anavezi ez eo ar gelennadurezh ac'h eus resevet, un dra diarvar.

Ganedigezh Yann Vadezour degemennet da Zakaria.

⁵ Bez' e voe, en amzer Herodez, roue Youdea, ur beleg, e anv Zakaria, eus rummad Abia, hag e bried, eus lignez Aaron, a oa hec'h anv Elizabed. ⁶ Reizh e oant o-daou dirak Doue, ha kerzhout a raent direbech, en holl c'hourc'hemennoù ha lezennoù an Aotrou; ⁷ met n' o devoa bugel ebet, dre ma oa gaonac'h Elizabed, hag aet o-daou war an oad. ⁸ Ha setu, un deiz m' edo Zakaria oc'h ober e garg a veleg dirak Doue pa oa deuet tro e rummad, ⁹ e c'hoarvezas ma voe galvet dre ar sord, diouzh giz ar velegiezh, da vont e-barzh santual an Aotrou, evit kinnig an ezañs. ¹⁰ Hag holl engroez ar bobl a oa er-maez o pediñ, da goulz an ezañs. ¹¹ Hogen setu Ael an Aotrou oc'h en em ziskouez dezhañ, en e sav, en tu dehoù da aoter an ezañs. ¹² Strafulhet e voe Zakaria ouzh e welout, ha spont a gouezhas warnañ. ¹³ Met an Ael a lavaras dezhañ : «Na spont ket, Zakaria, rak selaouet eo bet da bedenn : da bried Elizabed a c'hano dit ur mab, hag e roi dezhañ Yann da anv. ¹⁴ Un abeg a levez hag a laouenidigezh e vezo evidout, ha kalz en em laouenaio gant e c'hanedigezh. ¹⁵ Rak bras e vo dirak an Aotrou; ne evo na gwîn, nag evaj kreñv; leun e vo eus ar Spered Santel, adalek korf e vamm; ¹⁶ hag e lakaio kalz eus mibien Israel da zistreiñ ouzh an Aotrou, o Doue. ¹⁷ Eñ e-unan a gerzho dirazañ gant spered ha galloud Elia, evit *distreiñ kalonoù an tadoù war-zu o bugale*, hag an dud disant war-zu furnez ar re reizh, evit aozañ d'an Aotrou ur bobl tuet-mat.» ¹⁸ Ha Zakaria da lavarout d'an Ael : «Diouzh petra e welin gwirionez an dra-se? Rak me a zo kozh, ha va fried a zo aet war an oad.» ¹⁹ Hag an Ael da respont dezhañ : «Me eo Gabriel hag en em zalc'h dirak an Aotrou. Kaset on bet da gomz ouzhit ha da zegemenn dit ar c'heloù mat-mañ. ²⁰ Setu eta ma vezi mut hep gallout komz muioc'h, betek an deiz ma tegouezho an traoù-mañ, dre n' ec'h eus ket kredet em lavarou hag a zeuio da wir d'o c'houlz.» ²¹ E-keit-se edo ar bobl o c'hortoz Zakaria ha souezhet e oant gant an amzer ma talee er santual. ²² Pa zeuas er-maez, n'helle ken komz outo, hag e komprenjont en devoa bet ur weledigezh er santual. Hag eñ a zalc'he d' ober gwignoù dezho; met chom a reas mut.

²³ Neuze, echuet gantañ e zeizioù-servij, e tistroas d' ar gêr. ²⁴ Ha war-lerc'h an deizioù-se e koñsevas e bried Elizabed; ha chom a reas kuzhet e-pad pemp miz. ²⁵ Lavarout a rae : «Setu petra en deus graet an Aotrou em c'heñver, en deizioù m' en deus sellet ouzhin gant madelezh evit tennañ diwarnon ar pezh a oa va mezh.»

An Arc'hael Gabriel o tegemenn ganedigezh Jezuz.

²⁶ Er c'hwec'hvet miz e voe kaset an Ael Gabriel gant Doue d' ur gêr a C'halilea anvet Nazared, ²⁷ da gaout ur werc'hez gouestlet e dimezi d' un den anvet Jozef, eus tiegezh David, hag anv ar werc'hez a oa Mariam. ²⁸ Hag antreet en he betek e lavaras : «Bez laouen, leun a c'hras, an Aotrou a zo ganit !» ²⁹ Hi avat a voe strafuilhet gant ar gerioù-se, oc'h en em c'houlenn petra 'oa ar salud-se. ³⁰ Hag an Ael a lavaras dezhi : «Na spont ket, Mari, gras ac'h eus kavet dirak Doue. ³¹ Setu

ma vi dougerez, ha ma c'hani ur mab, hag e roi dezhañ Jezuz da anv. ³² Hennezh a vo bras ha Mab an Uhelañ a vo graet anezhañ, hag an Aotrou Doue a roy dezhañ tron David, e dad. ³³ Ren a ray war diegezh Yakob da virviken, hag e rouantelezh ne vo dibenn ebet dezhi.» ³⁴ Neuze e lavaras Mari d'an Ael : «Penaos e c'hoarvezo kement-se pa n'anavezan ket ar gwaz?» ³⁵ Hag an Ael a respontas dezhi :

«Ar Spered Santel a zeuio warnout, ha galloud an Uhelañ az koloio gant e skeud; rak-se eta, da grouadur santel a vo anvet Mab Doue.

³⁶ Ha gwel, Elizabed da garez, setu m'he deus roet ar genel d'ur mab en he c'hozhni, hag ar miz-mañ eo ar c'hwec'hvet evit an hini a veze anvet gaonac'h; ³⁷ rak *n'eus netra a vefe trec'h da c'halloud Doue.*» ³⁸ Ha Mari da lavarout : «Setu servijerez an Aotrou : ra vo graet din hervez da lavar.» Hag ez eas an Ael kuit diouti.

Gweladenn Vari da Elizabed.

³⁹ En deizioù-se, e savas Mari, hag ez eas, mall warni, war-zu bro ar menezioù, d'ur gêr eus Bro Youda; ⁴⁰ hag o vezañ aet tre e ti Zakaria, e saludas Elizabed. ⁴¹ Met kerkent ha ma klevas Elizabed salud Mari, e tridas ar c'hrouadurig en he c'hreiz, ha leuniet e voe Elizabed eus ar Spered Santel. ⁴² Hag e youc'has gant ur vouezh kreñv en ur lavarout : «Benniget out e-touez ar gwraez, ha benniget frouezh da gorf. ⁴³ A belec'h e c'hoarvez ganin e teufe d'am c'haout mamm va Aotrou? ⁴⁴ Rak setu, kerkent ha m'eo deuet da vouezh betek va divskouarn, en deus tridet va bugelig em c'hreiz gant al levenez. ⁴⁵ Eürus an hini he deus kredet, rak sevenet e vo ar pezh a zo bet lavaret dezhi a-berzh an Aotrou.»

⁴⁶ Hag e lavaras Mari :

«Va ene a gan brasted an Aotrou,

⁴⁷ ha va spered a gav e levenez e Doue, va Salver !

⁴⁸ Dre m'en deus sellet ouzh izelded e vatezh,

Setu a-vremañ, ma vin anvet eürus gant an holl rummadoù.

⁴⁹ An Hollc'halloudeg en deus graet evidon traoù burzhudus,
an hini a zo santel e anv.

⁵⁰ E drugarez en em astenn a rummad da rummad

war gement hini en deus doujañs outañ.

⁵¹ Diskouezet en deus nerzh e vrec'h

ha dispennet ar re a zo brasoni en o c'halon.

⁵² Diskaret en deus an dud c'halloudek diwar o zron,

hag uhelaet an dud izel.

⁵³ Ar re naoniek en deus karget a vadoù,

ar re binvidik en deus kaset kuit hep netra.

⁵⁴ Kemeret en deus etre e zivrec'h Israel, e vugel, evit kaout soñj eus e druez,

⁵⁵ hervez m'en devoa grataet d'hon tadoù

e-keñver Abraham hag e lignez da viken.»

⁵⁶ Chom a reas Mari war-dro tri miz gant Elizabed, ha neuze e tistroas d'ar gêr.

Ganedigezh Yann.

⁵⁷ Elizabed, pa voe echu hec'h amzer ganti, a c'hanas ur mab. ⁵⁸ Hec'h amezeien hag he c'herent o klevout en devoa an Aotrou lakaet e drugarez da skediñ en he c'heñver, en em laouenaas a-gevret ganti. ⁵⁹ D'an eizhvet deiz, e teujont da amdroc'hañ ar bugel, hag e felle dezho e envel Zakaria, diouzh anv e dad. ⁶⁰ Met e vamm o tont er gaoz a lavaras : «Nann ! anvet e vo Yann.» ⁶¹ Hag int da lavarout dezhi : «Met n'eus den ez kerentiezh o tougen an anv-se !» ⁶² Neuze e c'houlennjont dre wign digant e dad penaos e felle dezhañ e vefe anvet. ⁶³ Hemañ a c'houlennas un dablezenn hag a skrivas warni : “ Yann eo e anv “. Ha souezhet e chomas an holl. ⁶⁴ Kerkent avat, e voe digoret e c'henoù ha distagellet e deod, hag e komze o veuliñ Doue. ⁶⁵ Estlamm a gouezhas war o holl amezeien, ha dre holl vro ar menez eus Youdea, e oa kaoz eus an darvoudoù-se, ⁶⁶ ha kement hini a gleve komz anezho, o mire en e galon, hag a lavare : «Petra eta e vo ar bugel-se?» Rak e gwirionez edo dorn an Aotrou gantañ.

Kantik Zakaria.

⁶⁷ Ha Zakaria, e dad, a voe leuniet eus ar Spered Santel hag a ziouganas en ur lavarout :

⁶⁸ «Ra vo benniget an Aotrou, Doue Israel,
Dre m'eo deuet da welout ha da zaspren e Bobl.

⁶⁹ Da sevel dimp un nerzh a silvidigezh,
E tiegezh David, e servijer.

⁷⁰ Evel m'en devoa degemennet en amzer wezhall
Dre c'henoù e Sent, e Brofeded :

⁷¹ Silvidigezh evit hon dieubiñ diouzh hon enebourien,
Diouzh daouarn an dud a vag ouzhimp kasoni;

⁷² Evit diskouez trugarez e-keñver hon tadoù,
Ha kaout soñj eus e Emglev santel,

⁷³ Eus al le en devoa touet da Abraham, hon Tad,
E roje dimp ar c'hras da vezañ dizaon,

⁷⁴ Bet tennet a-dre daouarn hon enebourien,
Evit e servijañ ⁷⁵ er santelezh hag er reizhder
Dirazañ a-hed hon holl vuhez.

⁷⁶ Ha te, bugelig, te vo anvet profed an Uhel-meurbet;
kerzhout a ri a-ziaraok d'an Aotrou evit kempenn e hentoù,

⁷⁷ evit lakaat e bobl da anaout ar silvidigezh
dre ar pardon eus ar pec'hedoù,

⁷⁸ Abalamour da galon drugarezus hon Doue
a lakaio heol ar beure da zont eus an uhel d'hor gwelout,

⁷⁹ evit sklêrijennañ ar re azezet en deñvalijenn hag e skeud ar marv,
ha ren hor c'hammedoù en hent ar peoc'h.»

⁸⁰ Ar bugel a greske hag e spered a greñvae.

Hag e chomas el lec'hioù distro betek an deiz m'en em ziskouezas da Israel.

Ganedigezh Jezuz e Betlehem.

2 ¹ En deizioù-se e voe embannet ur gourc'hemenn a-berzh Kaesar Aogustus evit enskrivañ holl dud an douar. ² Ar skrid-embann kentañ-se a voe graet p'edo Kurinus gouarnour Siria. ³ Mont a rae an holl da lakaat o anvioù, pep hini d'e gêr. ⁴ Jozef a savas eus Galilea, eus Kêr Nazared, da Vro-Youdea, betek kêr David anvet Betlehem, o vezañ ma oa eus tiegezh ha Bro-David, ⁵ da lakaat e anv gant Mari, e bried, hag a oa dougerez. ⁶ Hag e-pad m'edont eno e teuas eviti an amzer da wilioudiñ ⁷ hag e c'hanas he mab kentañ-ganet; e vailhurañ a reas hag e lakaat a reas en e c'hourvez en ur prezeb, dre ne oa ket plas evito en ostaleri.

⁸ Mêsæerien a oa er c'hornad-se o chom neuze war ar maez hag oc'h ober ged e-pad an noz da ziwall o loened. ⁹ Un Ael eus an Aotrou a skedas en-dro dezho, ma voent spontet bras. ¹⁰ Met an Ael a lavaras dezho : «Na spontit ket, rak setu ma tegemennan deoc'h ur c'heloù mat hag a roio levez vras d'an holl bobl. ¹¹ Ganet ez eus bet deoc'h hiziv, e kêr David, ur Salver, hag a zo ar C'hrist, an Aotrou. ¹² Ha setu an arouez evidoc'h : Kavout a reot ur bugelig mailhuret ha gourvezet en ur prezeb.» ¹³ Hag en un taol ec'h en em unanas gant an Ael ur bagad bras eus armead an neñvoù o veuliñ Doue hag e lavarent : ¹⁴ «Klod da Zoue e lein an Neñvoù, ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ.» ¹⁵ Pa voe aet an Aeled diouto war-zu an neñv, e lavaras ar vêsæerien an eil d'egile : «Deomp eta betek Betlehem ha gwelomp ar pezh a zo c'hoarvezet hag a zo bet disklêriet dimp gant an Aotrou.» ¹⁶ Hag ez ejont, mall warno, hag e kavjont Mari ha Jozef hag ar bugelig gourvezet er prezeb. ¹⁷ O welout se ec'h anavezjont ar wirionez eus ar pezh a oa bet lavaret dezho diwar-benn ar bugel-se; ¹⁸ ha kement hini o c'hlevas a voe sebezet gant ar pezh a gonte ar vêsæerien dezho. ¹⁹ Mari avat, a vire an holl draoù-se hag a brederie warno en he c'halon. ²⁰ Neuze ez eas ar vêsæerien en-dro, en ur reiñ klod ha meuleudi da Zoue, evit kement o devoa gwelet ha klevet, hervez ma oa bet lavaret dezho.

Jezuz amdroc'het ha kinniget en Templ.

²¹ A-benn an eizhvet deiz merket evit amdroc'hañ ar bugel, e voe roet Jezuz da anv dezhañ, evel ma oa bet anvet gant an Ael, a-raok bezañ bet krouet e korf e vamm.

²² Hag a-benn an deizioù merket evit ar buridigezh, hervez Lezenn Voizez, er c'hasjont da Jeruzalem, da vezañ kinniget d'an Aotrou, ²³ evel ma'z eo skrivet e Lezenn an Aotrou : «*Pep mab kentañ-ganet a vo gouestlet d'an Aotrou*», ²⁴ ha da reiñ ur prof, hervez ma'z eo lavaret e Lezenn an Aotrou : «*Ur re durzhunelled, pe ziv goulm yaouank*.» ²⁵ Ha bez' e oa e Jeruzalem un den, e anv Simeon; hag an den-se a oa reizh hag a zoujañs Doue, hag a c'hortoze frealzidigezh Israel; hag ar Spered Santel a oa gantañ. ²⁶ disklêriet e oa bet dezhañ gant ar Spered Santel ne welje ket ar marv, a-raok dezhañ gwelout Krist an Aotrou. ²⁷ Lusket gant ar Spered, e teuas d'an Templ, ha pa voe degaset ar bugel Jezuz gant e gerent evit ober diouzh kustumoù al Lezenn en e geñver, ²⁸ er c'hemeraz etre e zivrec'h hag e vennigas Doue en ur lavarout :

²⁹ «Bremañ, o Mestr, lezit ho servijer,
hervez ho komz, da dremen e peoc'h;

³⁰ Rak gwelet o deus va daoulagad ho silvidigezh,

³¹ An hini hoc'h eus aozet dirak an holl bobloù,

³² Gouloù da sklêrijennañ ar broadoù
ha klod evit ho pobl Israel.»

³³ E dad hag e vamm a estlamme ouzh ar pezh a lavared diwar e benn. ³⁴ Ha Simeon o bennigas hag a lavaras da Vari, e vamm : «Gwel ! Hemañ a zo lakaet da vezañ diskar hag adsav evit kalz en Israel, ha da vezañ an arouez a enebiezh - ³⁵ ha te a vo treuzet da ene gant ar c'hleze, - ma vo diskuliet mennozhioù kalz a galonoù.»

³⁶ Hag e oa ivez un diouganerez, Anna, merc'h Fanouel, eus meuriad Aser. Erru e oa kozh-bras. Goude hec'h eured he devoa bevet seizh vloaz gant he gwaz. ³⁷ Ha neuze chomet intañvez hag erru en oad a bevar-ugent vloaz, ne dec'he ket diouzh an Templ, o servijañ Doue noz-deiz, gant yun ha pedenn. ³⁸ O tegouezhout d'an ampoent, e stagas da veuliñ Doue ha da gomz eus ar bugel ouzh kement hini a c'hortoze dieubidigezh Jeruzalem.

³⁹ Ha goude bezañ sevenet pep tra, hervez Lezenn an Aotrou, e tistrojont da C'halilea, da Nazared, o c'hêr.

⁴⁰ Ar bugel a greske hag a greñvae, leun a furnez, ha gras Doue a oa warnañ.

Jezuz kollet hag adkavet.

⁴¹ Bep bloaz ez ae e gerent da Jeruzalem da geñver gouel Pask. ⁴² Pa voe deuet d'e zaouzek vloaz, e savas da Jeruzalem, hervez ma vez graet evit ar Gouel. ⁴³ Met war-lerc'h an deizioù-gouel evel ma tistroent d'ar gêr e chomas ar bugel Jezuz e Jeruzalem, hep gouzout d'e dud. ⁴⁴ O krediñ edo gant o c'henveajourien, e rejont un devezh-kerzhed, ha neuze d'e glask e-mesk o c'herentiezh ha tud o anaoudegezh. ⁴⁵ Ha pa n'e gavent ket, e tistrojont da Jeruzalem, bepred ouzh e glask. ⁴⁶ A-benn tri devezh er c'havjont en Templ, azezet e-touez an Doktored, ouzh o selaou, hag oc'h ober goulennoù outo. ⁴⁷ Ha sebezet e chome kement hini e gleve, gant e skiant hag e respontoù. ⁴⁸ Ouzh e welout e vanjont fromet hag e vamm a lavaras dezhañ : «Va bugel, perak ec'h eus graet evel-se dimp? Sell -ta ! Da dad ha me a oa ouzh da glask ankeniet-bras.» ⁴⁹ Hag e respontas dezho : «Perak eta am c'hlaskec'h. N'ouzoc'h ket em eus da vezañ gant traoù va Zad?» ⁵⁰ Met int ne gomprenjont ket ar gomz a lavare dezho.

⁵¹ Diskenn a eure ganto hag e teuas da Nazared, ha sujañ a rae dezho. E vamm a vire an holl draoù-se en he c'halon. ⁵² Ha Jezuz a greske en furnez, en ment hag en gras, dirak Doue ha dirak an dud.

Prezegerezh Yann.

3 ¹ Ar bemzekvet bloavezh eus impalaeriezh Tiberius Kaesar, pa oa Poñs-Pilat gouarnour Youdea, Herodez tetrark Galilea, Filip, e vreur, tetrark Iturea ha Bro-Drakonitiz, ha Lisania tetrark Bro-Abilen; ² dindan ar veleien-veur Anna ha Kaifaz ec'h en em roas komz Doue da glevout da Yann, mab Zakaria, en dezerzh; ³ ha mont a reas dre holl vro ar Yordan en ur embann ur vadeziant a binijenn evit distaol ar pec'hedoù, ⁴ evel ma'z eo skrivet e levr komzoù ar profed Izaia :

*«Ur vouezh o krial er gouelec'h :
Kempennit hent an Aotrou,
Kompezit e wenodennoù.*

*⁵Pep traonienn a vo leuniet,
ha pep menez ha pep krec'hienn a vo izelaet,
ar c'hildroioù a vo krennet
hag an hentoù roc'hellek a vo kompezet,
⁶hag e welo pep krouadur silvidigezh Doue.»*

⁷ Lavarout a rae eta d'an engroeziou-tud a zerede evit bezañ badezet gantañ : «Gorad naered, piv en deus desket deoc'h tec'hout diouzh ar gounnar o tont? ⁸ Grit eta pinijenn wirion a zougo frouezh. Ha n'it ket da lavarout ennoc'h hoc'h-unan : Hon Tad eo Abraham. Rak me lavar deoc'h e c'hell Doue, eus ar vein-mañ, sevel bugale da Abraham. ⁹ A-vremañ emañ ar vouc'hal ouzh gwrizioù ar gwez; kement gwezenn eta na daol ket frouezh mat a vo troc'het ha stlapet en tan.»

¹⁰ Hag e c'houlenne an engroeziou-tud digantañ : «Petra 'ta zo dimp d'ober?» ¹¹ Respont a rae dezho : «An neb en deus div vantell, reiñ unan d'an hini n'en deus ket; hag an neb en deus boued, ober kemend-all.» ¹² Publikaned ivez a zeuas evit bezañ badezet; hag int da lavarout dezhañ : «Mestr, petra zo dimp d'ober? ¹³ Hag e respontas dezho : «Na c'houlennit netra en tu all d'ar pezh a zo divizet deoc'h.» ¹⁴ Soudarded ivez a c'houlenne digantañ : «Ha ni, petra zo dimp d'ober?» Hag e lavarar dezho : «Na wallgasit den ebet, na ziskuilhit den ebet e gaou, ha tremenit gant ho kopr.»

¹⁵ Evel m'edo ar bobl war-c'hed ha ma 'n em c'houlenne an holl en o c'halonoù diwar-benn Yann hag-eñ ne vefe ket ar C'hrist, ¹⁶ e roas Yann e respont en ur zisklêriañ d'an holl : «Me ho padez gant dour, met dont a ra unan galloudusoc'h egedon, ha ned on ket dellezek da ziskoulmañ korreenn e sandalenoù. Eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan. ¹⁷ En e zorn emañ ar bal-wenterez da beurnaetaat e leuriad, ha da serriñ ar gwinizh en e solier; ar pell avat, o devañ a ray en un tan na varv ket.»

¹⁸ Gant an holl brezennoù-se hag e-leizh a re all e tegemenne d'ar bobl ar c'heloù mat. ¹⁹ Met Herodez an tetrark, hag a oa tamallet gant Yann en abeg da Herodiad, gwreg e vreur, hag en abeg d'an holl zrougberoù graet gantañ, ²⁰ a lakaas an torfed-mañ war benn an holl re all : serriñ a reas Yann er prizon.

Badeziant Jezuz.

²¹ Neuze pa oa bet badezet an holl bobl, e-pad ma oa badezet Jezuz ivez, ha ma oa o pediñ, e tigoras an neñv, ²² hag e tiskennas ar Spered Santel warnañ, dindan stumm ur c'horf, evel ur goulm, hag e teuas ur vouezh eus an neñv : «Te eo va Mab muiañ-karet; ennout em eus lakaet va levenez !»

Lignez Jezuz.

²³ Jezuz, pa stagas da brezeg, a oa war-dro tregont vloaz, ha mab e oa, war a greded, da Jozef, mab Heli, ²⁴ mab Mattat, mab Levi, mab Melc'hi, mab Ianna mab Jozef, ²⁵ mab Mattatias, mab Amos, mab Nahoum, mab Esli, mab Naggae, ²⁶ mab Maat, mab Mattatias, mab Semei, mab Iosec'h, mab Ioda, ²⁷ mab Ioanna, mab Resa,

mab Zorobabel, mab Salatiel, mab Neri, ²⁸mab Melc'hi, mab Addi mab Kosam mab Elmadam, mab Er, ²⁹ mab Jezuz, mab Eliezer, mab Iorim, mab Mattat, mab Levi, ³⁰mab Simeon, mab Youda, mab Jozef, mab Iona, mab Eliakim, ³¹ mab Melea, mab Menna, mab Mattata, mab Natan,

mab David, ³² mab Jese, mab Obed, mab Booz, mab Salmon, mab Naason, ³³mab Aminadab, mab Admin, mab Arni, mab Esrom, mab Fares, mab Youda, ³⁴mab Yakob, mab Izaak,

mab Abraham, mab Tare, mab Nac'hor, ³⁵mab Serouk, mab Ragou, mab Peleg, mab Heber, mab Sala, ³⁶ mab Kenan, mab Arfaksad, mab Sem, mab Noe, mab Lamek, ³⁷mab Matusala, mab Henoc'h, mab Iared, mab Malaleel, mab Kenan, ³⁸mab Enos, mab Set, mab Adam, mab Doue.

Jezuz temptet er gouelec'h.

4 ¹ Jezuz, leun eus ar Spered Santel, a zistroas eus ar Yordan, hag a voe renet gant ar Spered d'ar gouelec'h; ² eno, e-pad daou-ugent devezh, e voe temptet gant an diaoul. Ne zebras tamm ebet e-doug an deizioù-se, ha pa voent echu, en devoe naon. ³ Hag an diaoul a lavaras dezhañ : «Mard-out Mab Doue, lavar d'ar maen-mañ donet da vezañ bara.» ⁴ Met Jezuz a respontas dezhañ : «Skrivet eo : N'eo ket diwar vara nemetken e vevo an den.»

⁵ An diaoul neuze er c'hasas war an uhel, a ziskouezas dezhañ en ur predig-amzer, holl rouantelezhioù an douar, ⁶ hag a lavaras dezhañ : «Dit e roin an holl c'halloud-se ha gloar rouantelezhioù an douar, rak etre va daouarn ez eo bet lakaet, hag he reiñ a ran da neb a fell din; ⁷ te eta, ma stouez dirazon, e vo dit-te holl.» ⁸ Met Jezuz a respontas dezhañ :

«Skrivet eo : *An Aotrou, da Zoue, a azeuli, ha dezhañ hepken e tougi da zoujañs.*»

⁹ E gas a reas neuze da Jeruzalem, hag e lakaat war lein an Templ. Hag e lavaras dezhañ :

«Ma'z out Mab Doue, en em daol ac'hann d'an traoñ. ¹⁰ Rak skrivet eo :

"Gourc'hemenn a ray evidout d'e Aeled evit m'az tiwallint",

¹¹ ha c'hoazh : *"Da zougen a raint en o daouarn, gant aon na stokfes da droad ouzh ur maen".*»

¹² Met Jezuz a respontas dezhañ : «Lavaret eo : *"Ne dempti ket an Aotrou, da Zoue".*»

¹³ Hag o vezañ implijet pep stumm-temptadur, ez eas an diaoul dioutañ betek un degouezh mat.

Jezuz a stag da brezeg.

¹⁴ Distreiñ a reas Jezuz da C'halilea, dindan nerzh ar Spered, hag ar vrud anezhañ a redas dre an holl vro tro-zro. ¹⁵ Kelenn a rae en o sinagogennoù, ha meulet e veze gant an holl.

Jezuz e Nazared.

¹⁶ Dont a reas da Nazared lec'h ma oa bet savet hag ez eas, hervez e voaz, da zeiz ar sabad, d'ar sinagogenn; ha sevel a reas en e sav, evit ober al lennadenn. ¹⁷ Roet e voe dezhañ levr ar Profed Izaia, hag o vezañ dirollet al levr, e kavas an arroud ma'z eo skrivet ennañ :

¹⁸ «*Spered an Aotrou zo warnon,
rak va olevel en deus;
va c'haset en deus da zegemenn
ar C'heloù Mat d'ar beorien,
da embann d'ar brizonidi o dieubidigezh,
ha d'an dalled o distro d'ar gweled;
da reiñ d'ar re wasket o frankiz,
¹⁹ ha da embann
ur bloavezh a c'hras a-berzh Doue.*»

²⁰ Rollañ a reas al levr, en reiñ en-dro d'ar servijer, ha mont en e goazez; ha sellou an holl er sinagogenn a bare warnañ. ²¹ Neuze e stagas da lavarout dezho : «Hiziv, e teu da wir al lavar-se eus ar Skritur o deus klevet ho tivskouarn.» ²² Hag an holl a roe testeni dezhañ, hag a oa souezhet gant ar c'homzoù kaer a zeue eus e c'henoù. Ma lavarent : «Daoust ha n'eo ket hennezh mab Jozef?» ²³ Hag eñ da respont dezho : «Hep mar ebet, e lavarot din ar c'hrennlavar-mañ : Mezeg, en em yac'ha da-unan. An traoù ken bras hon eus klevet ac'h eus graet evit Kafarnaoum, o gra amañ ivez ez pro.» ²⁴ Hag e lavaras c'hoazh :

«E gwirionez, me lavar deoc'h, profed ebet ne vez degemeret mat en e vro.²⁵ a dra sur, me lavar deoc'h, e oa kalz a intañvezed en Israel en amzer Elia, pa voe serret an oabl e-pad tri bloaz ha c'hwec'h miz, en doare ma c'hoarvezas ur gernez vras dre ar vro a-bezh; ²⁶ koulskoude da gaout hini anezho ne voe kaset Elia, nemet da gaout un intañvez eus Sarepta, e Bro – Sidon. ²⁷ Ha kalz a dud lovr a oa ivez en Israel, da vare ar profed Elizea, ha koulskoude hini anezho ne voe glanaet nemet Naaman ar Siriad.»

²⁸ Leun a fulor e oant holl er sinagogenn o klevout kement-se. ²⁹ Hag int o sevel d'e vountañ er-maez eus kêr, ha d'e gas betek un tarroz eus ar menez ma oa savet o c'hêr warnañ, evit e stlepel d'an traoñ. ³⁰ Eñ avat, o tremen dre o c'hreiz, a yeas kuit.

Jezuz o prezeg hag o pareañ tud e Kafarnaoum.

³¹ Diskenn a reas neuze da Kafarnaoum, kêr eus Galilea; ha kelenn a rae an dud d'an deizioù – sabad. ³² Souezhet bras e oant gant e gelennadurezh, rak gant beli e komze outo. ³³ Bez' e oa er sinagogenn un den hag a oa ennañ spered un diaoul hudur. En em lakaat a reas da youc'hal gant ur vouezh kreñv : ³⁴ «A ! petra a glaskez ouzhimp-ni, Jezuz a Nazared? Ha deuet out d'hon distrujañ? Gouzout a ouzon piv out-te : Sant Doue.» ³⁵ Jezuz en gourdrouzas o lavarout : «Tav, ha kae er-maez eus an den-se.» An diaoul neuze ouzh en strinkañ d'an douar e-kreiz an dud, a yeas er-maez eus an den hep ober droug ebet dezhañ. ³⁶ Ma kouezhas sebez warno holl, hag e lavarent an eil d'egile : «Petra eo se? ma c'hourc'hemenn gant galloud ha nerzh d'ar speredoù hudur hag ez eont er-maez !» ³⁷ Hag ar vrud anezhañ en em skigne e pep lec'h dre ar vro.

³⁸ Jezuz o sevel hag o kuitaat ar sinagogenn a antreas e ti Simon. Mamm-gaer Simon a oa dalc'het gant un derzhienn vras; hag e bediñ a rejont eviti. ³⁹ Hag eñ oc'h en em zerc'hel a-us dezhi, a c'hourc'hemennas d'an derzhienn hag ez eas an derzhienn diouti. Kerkent e savas hag en em lakaas d'o servijañ.

⁴⁰ Da vare kuzh-heol, an holl dud o devoa klañvourien dalc'het gant kleñved pe gleñved, o degasas dezhañ; hag eñ en ur astenn e zorn war bep hini en o faree. ⁴¹ Drouksperedoù ivez a yae er-maez eus kalz, en ur grial hag en ur lavarout : «Te eo Mab Doue.» Eñ avat o gourdrouze ha n'o leze ket da gomz, rak gouzout a raent e oa eñ ar C'hrist.

⁴² Pa voe deuet an deiz, e teuas er-maez hag ez eas d'ul lec'h distro. An engroeziou-tud hag a oa ouzh e glask a zeuas neuze betek ennañ; ha derc'hel a raent warnañ evit ma ned aje ket diouto. ⁴³ Met eñ a lavaras dezho : «D'ar c'hêrioù all ivez e tlean degemenn keloù mat Rouantelezh Doue, rak evit se on bet kaset.» ⁴⁴ Hag e veze o prezeg e sinagogennoù Galilea.

Pesketaerezh burzhudus.

5 ¹ Un deiz m'edo ar bobl ouzh e waskañ a-dost evit klevout komz Doue edo eñ war ribl lenn C'henezared; ² hag e welas div vag ouzh an aod; ar besketaerien a oa diskennet diwarno hag e oant o walc'hiñ o rouedoù. ³ Pignat a eure en unan eus ar bagoù, hini Simon, ha goulenn digantañ pellaat un tammig diouzh an douar. Hag o vezañ aet en e goazez, e kelenne ar bobl eus ar vag. ⁴ P'en devoe echuet da gomz e lavaras da Simon : «Kae d'an donvor, ha laoskit ho rouedoù e-barzh evit pesketa.» ⁵ Ha Simon da respont dezhañ : «Mestr, a-hed an noz hon eus poaniet, ha mann n'hon eus paket; diwar da lavar avat, e laoskin ar rouedoù e-barzh.» ⁶ Ober a rejont hag e klozjont un niver bras a besked, ma roge o rouedoù. ⁷ Gwignal a rejont neuze d'o c'hevelerien hag a oa en eil bag, da zonet d'o sikour; donet a rejont hag e leugnjont an div vag, ken na ziskennent en dour. ⁸ O welout se, e kouezhas Simon Pêr ouzh daoulin Jezuz en ur lavarout : «Kae diouzhin, Aotrou, rak ur pec'her ez on-me !» ⁹ Rak ar sebez a oa kroget ennañ hag en holl dud a oa gantañ, en abeg d'an taol-pesketaerezh o devoa graet. ¹⁰ Heñvel e oa gant Jakez ha Yann, mibien Zebedea, hag a oa kevelerien Simon. Jezuz avat a lavaras da Simon : «N'a ket da spontañ ! Hiviziken ez eo tud a baki.» ¹¹ Sachañ a rejont ar bagoù d'an douar hag o tilezel pep tra ez ejont d'e heul.

Un den lovr pareet.

¹² Un drovezh m'edo en ur gêr bennak, setu eno un den goloet a lorgnez. Hag o welout Jezuz e soublas war e c'henoù dirazañ hag e reas ar bedenn-mañ dezhañ : «Aotrou, mar fell dit, e c'hellez va glanaat.» ¹³ Jezuz a astennas e zorn hag a stokas outañ en ur lavarout : «Me a fell din, bez glanaet.» Ha raktal ez eas al lorgnez dioutañ. ¹⁴ Met Jezuz a zifennas outañ en lavarout da zen : «Hogen kae, emezañ d'en em ziskouez d'ar beleg, ha kinnig evit da c'hlanidigezh, ar pezh en deus gourc'hemennet Moizez, ma vo kement-se da desteni dezho.» ¹⁵ Mui-ouzh-mui e save kaoz diwar e benn, hag e terede engroeziou niverus d'e glevout ha da vezañ pareet eus o c'hleñvedoù. ¹⁶ Eñ avat en em denne d'al lec'hioù distro hag a veze o pediñ.

Un den seizet pareet.

¹⁷ Un deiz bennak m'edo o kelenn, ec'h en em gave azezet eno Farizianed ha Doktored eus al Lezenn hag a oa deuet eus pep bourc'h a C'halilea hag a Youdea hag eus Jeruzalem; ha galloud

an Aotrou a oa gantañ da bareañ. ¹⁸ Ha setu paotred o tougen war ur gwele un den hag a oa seizet, hag e klaskent e zegas e-barzh an ti evit e lakaat dirazañ. ¹⁹ Pa ne gavent tu ebet d'e zegas e-barzh, en abeg d'an engroez, e pignjont war an doenn, hag a-dreuz an teol en diskennjont gant e weleig e-kreiz an dud, dirak Jezuz. ²⁰ O welout o feiz e lavaras : «Va faotr, distaolet eo dit da bec'hedoù.» ²¹ Neuze e krogas ar Skribed hag ar Farizianed d'en em soñjal ha da lavarout : «Piv eo hemañ hag a lavar komzoù disakr? Piv a c'hell disteurel ar pec'hedoù, nemet Doue hepken?» ²² Met Jezuz oc'h anavezout o soñjoù a respontas dezho : «Perak e soñjit evel-se en ho kalonoù? ²³ Petra eo an aesañ, pe lavarout : "Distaolet eo dit da bec'hedoù"; pe lavarout : "Sav ha kerzh"? ²⁴ Ac'hanta ! evit ma anavot en deus Mab an Den war an douar, galloud da zisteurel ar pec'hedoù : Me lavar dit, emezañ d'an den seizet, sav, kemer da weleig, ha distro d'ar gêr.» ²⁵ War an taol, eñ da sevel dirak o daoulagad, da gemerout ar pezh ma oa gourvezet warnañ, ha da vont d'ar gêr en ur veuliñ Doue. ²⁶ Saouzan neuze a grogas enno holl, ha meuliñ a raent Doue, leun a spont ma oant e lavarent : «Traoù espar hon eus gwelet hiziv !»

Galvidigezh Levi. Tabut war ar yun.

²⁷ Goude-se ez eas er-maez, hag e paras e selloù war ur publikan, e anv Levi, azezet e burev ar maltouterezh, hag e lavaras dezhañ : «Deus d'am heul.» ²⁸ Hag hemañ o tilezel pep tra, a savas evit mont d'e heul. ²⁹ Ur pred bras a reas Levi evitañ en e di. Hag un niver bras a druajerien hag a dud all a oa ouzh taol ganto. ³⁰ Grozmolat a rae ar Farizianed hag o Skribed o lavarout d'e ziskibien : «Perak e tebrit hag ec'h evit gant ar publikaned hag ar bec'herien?» ³¹ Met Jezuz o respont a lavaras dezho : «N'eo ket ar re yac'h o deuz ezhomm eus ar mezeg, met ar re glañv. ³² N'on ket deuet da c'hervel an dud reizh, met ar bec'herien d'ar binijenn.»

³³ Int avat a respontas dezhañ : «Diskibien Yann a yun alies, ha pedennoù a reont; en hevelep doare ivez diskibien ar Farizianed; da re-te avat a ev hag a zebr.» ³⁴ Jezuz a respontas dezho : «Daoust hag e c'hellit lakaat ar baotred-a-enor da yunañ e-pad m'emañ an den nevez ganto? ³⁵ Donet a ray deizioù ma vo bet dilamet an den nevez diganto; en deizioù-se neuze e yunint.» ³⁶ Hag e lavaras dezho c'hoazh un heñveladur : «Den ebet ne rog ur peñsel diwar ur vantell nevez d'e lakaat war ur vantell gozh, pe neuze en devo roget e vantell nevez, hep na vefe ar peñsel nevez-se o toniañ gant ar vantell gozh. ³⁷ Na den ebet kennebeut-all ne laka gwin nevez e seier kozh; pe neuze e tarzho gant ar gwin nevez ar seier kozh; ar gwin a vo skuilhet hag ar seier kollet. ³⁸ Hogen ar gwin nevez eo e seier-lêr nevez e tleer e lakaat. ³⁹ Na den ebet, p'emañ oc'h evañ gwin kozh ne fell dezhañ hini nevez, rak lavarout a ra : «An hini kozh a zo gwell.»

Pennoù-ed diframmet un deiz - sabad.

6 ¹ Un deiz - sabad ma kerzhe Jezuz a-dreuz trevadoù-ed, e ziskibien a ziframme pennoù-ed hag o debre goude o freuzañ etre o daouarn. ² Hiniannoù eus ar Farizianed a lavare : «Perak e rit ar pezh n'eo ket aotreet ober d'ar sabad?» ³ Respont a reas Jezuz dezho : «Nag an dra-se n'hoc'h eus ket lennet, petra a reas David pa c'hoarvezas dezhañ kaout naon, eñ hag e gompagnuned? ⁴ Penaos ez eas e ti Doue, hag o kemer baraennoù ar C'hinnig, e tebras hag e roas diouto d'ar re a oa gantañ, ar baraennoù-se ha ned eo aotreet da zen o debriñ, nemet d'ar veleien hep muiken.» ⁵ Hag e lavaras dezho : «Mestr eo Mab an Den war ar sabad.»

Un den disec'het e zorn hag ar sabad.

⁶ Un deiz sabad all, ez eas e-barzh ar sinagogenn, hag en em lakaas da gelenn. Bez' e oa eno un den disec'het e zorn dehoù. ⁷ Sellout a rae gant evezh outañ ar Skribed hag ar Farizianed da welout ha da zeiz ar sabad e rafe ur bareidigezh, dezho da gaout abeg d'e damall. ⁸ Eñ avat a anaveze o soñjoù; ha neuze e lavaras d'an den disec'het e zorn : «Sav ha deus amañ er c'hreiz.» Sevel a reas ha chom aze en e sav. ⁹ Ha Jezuz da lavarout dezho : «En goulenn a ran ouzhoc'h : daoust hag aotre a zo, da zeiz ar sabad, da ober vad pe da ober droug, da saveteiñ buhez un den pe d'e lezel da vervel?» ¹⁰ Tremen a reas neuze e selloù warno holl, hag e lavaras d'an den : «Astenn da zorn.» En ober a reas, ha setu yac'h e zorn en-dro. ¹¹ Int avat a yeas ur c'horfad-droug enno; hag e klaskent kenetrezo petra c'hellent ober da Jezuz.

Dilenn an Daouzek.

¹² En deizioù-se en em dennas Jezuz war ar menez da bediñ, hag e tremenas an noz penn-da-benn o pediñ Doue. ¹³ Ha pa c'houlouas an deiz, e c'halvas e ziskibien hag e tibabas daouzek anezho a anvas Ebestel : ¹⁴ Simon, a reas ivez Pêr anezhañ, Andrev e vreur, Jakez, Yann, Filip, Bartolome, ¹⁵ Mazhev, Tomaz, Jakez, mab Alfe, Simon lesanvet ar Zelot, ¹⁶ Jud, breur Jakez, ha Youdaz Iskariot, an hini a zeuas da vezañ trubard.

An engroezioù-tud en-dro da Jezuz.

¹⁷ Ha diskennet ganto, e chomas a-sav en ul lec'h kompez. Ha sed eno un niver bras eus e ziskibien, hag un engroez stank a dud eus Youdea a-bezh hag eus Jeruzalem, hag eus arvor Tir ha Sidon, ¹⁸ a oa deuet d'e glevout ha da vezañ paret eus o c'hleñvedoù. Ar re gwasket gant speredoù hudur a veze yac'haet ivez. ¹⁹ Hag an holl bobl a glaske stekiñ outañ, rak un nerzh a zeue dioutañ hag o faree holl.

Gwenvidigezhioù ha mallozhioù.

²⁰ Eñ neuze o sevel e zaoulagad war e ziskibien a lavaras :

«Eürus oc'h, c'hwi ar beorien,
rak deoc'h ez eo Rouantelezh Doue.

²¹ Eürus oc'h, c'hwi ar re o deus naon bremañ, rak ho kwalc'h ho po.
Eürus oc'h, c'hwi ar re a ouel bremañ,
rak c'hoazhin a reot.

²² Eürus e vezot pa vezot kasaet gant an dud,
ha pa vezot forbannet, dismegañset,
pa vo distaolet hoc'h anv, evel ur vezh,
abalamour da Vab an Den.

²³ Bezit laouen, en deiz-se,
ha tridit gant al levenez,
rak setu ma vo bras ho kopr en Neñv;
e giz-se ivez e rae o zadoù d'an diouganerien.

²⁴Gwa c'hwi avat, ar binvidien,
dre m'hoc'h eus ho frealzidigezh !
²⁵Gwa c'hwi ar re o deus o gwalc'h bremañ,
rak e kañv hag e gouelvan e vezot !
²⁶Gwa c'hwi, pa vo komzet brav
diwar ho penn gant an holl dud,
rak e giz-se ivez e rae o zadoù
d'ar falsprofeded.»

Karantez ha truez ouzh an enebourien.

²⁷ «Met deoc'h-c'hwi hag am selaou, e lavaran : Karit hoc'h enebourien, grit vad d'ar re ho kasa. ²⁸Benniget ar re ho millig; pedit evit ar re a zroukkomz diwar ho penn. ²⁹D'an hini a sko ganit war ur jod, kinnig c'hoazh eben; hag ouzh an hini a lam da vantell diganit, na nac'h ket da doneg kennebeut-all. ³⁰Ro da neb a c'houlenn diganit, ha digant an hini a laero da draoù ne c'houlenn ket en-dro. ³¹Evel ma karit e rafe deoc'h an dud, evel-se ivez grit dezho. ³²Mar karit ar re ho kar, peseurt trugarez a zo dleet deoc'h? rak ar bec'herien ivez a gar ar re o c'har. ³³Ha mar grit vad d'ar re a ra vad deoc'h-c'hwi, peseurt trugarez a zo dleet deoc'h? Ar bec'herien ivez a ra kemend-all. ³⁴Ha mar prestit arc'hant d'ar re hoc'h eus spi da resev diganto, peseurt trugarez a zo dleet deoc'h? Ar bec'herien ivez a brest d'ar bec'herien, evit resev en-dro kemend-all. ³⁵C'hwi avat, karit hoc'h enebourien; grit vad ha prestit arc'hant hep gortoz mann en-dro. Neuze e vo bras ho kopr hag e vezot mibien d'an Uhelañ, rak eñ a zo madelezhuz zoken e-keñver ar re dianaoudek hag ar re fall. ³⁶Bezit trugarezus evel m'eo ho Tad trugarezus. ³⁷Na varnit ket ha ne vezot ket barnet; na gondaonit ket ha ne vezot ket kondaonet; pardonit hag e vezot pardonet. ³⁸Roit hag e vo roet deoc'h; ur muzuliad kaer, stardet, hejet-dihejet, ha leun dreist ar barr, a vo diskennet deoc'h en ho parlenn. Diouzh ar muzul a uzit gantañ e vo muzuliet deoc'h d'ho tro.»

Mestr ha diskibl.

³⁹Lavarout a reas ivez dezho ur barabolenn : «Daoust hag e c'hell un den dall heñchañ un den dall? Daoust ha ne gouezhint ket o-daou en ur poull bennak? ⁴⁰N'emañ ket an diskibl a-us d'e vestr, hogen pep diskibl peurstummet a vo evel e vestr. ⁴¹Perak e taolez evezh ouzh ar blouzenn a zo e lagad da vreur, hag an treust a zo ez lagad-te, n'en gwelez ket? ⁴²Penaos e c'hellez lavarout d'az preur : Breur, va lez da zilemel ar blouzenn a zo ez lagad, ha te o chom hep gwelout an treust a zo ez hini? Pilpouz, dilam da gentañ an treust a zo ez lagad, ha neuze e weli sklaer da zilemel ar blouzenn a zo e lagad da vreur.

Ar wezenn vat hag ar wezenn fall.

⁴³ «N'eus ket a wezenn vat oc'h ober frouezh fall, na kennebeut a wezenn fall oc'h ober frouezh mat. ⁴⁴Rak diouzh he frouezh e vez anavezet pep gwezenn; n'eo ket diwar ar spern e vez dastumet fiez, na diwar an drez e vez mendemet rezin. ⁴⁵An den mat a denn ar mad eus teñzor mat e galon, hag an den drouk a denno an droug eus e zrougiezh. Rak diouzh ar pezh a leugn ar galon e komz ar genoù.

Ober diouzh an Aviel eo ar pezh a zo ret.

⁴⁶ «Perak am galvit-hu : Aotrou, Aotrou, ha ne rit ket ar pezh a lavaran? ⁴⁷ An neb a zeu davedon hag a selaou va c'homzoù hag a ra diouto, ez an da ziskouez deoc'h ouzh piv ez eo heñvel. ⁴⁸ Heñvel eo ouzh un den o sevel un ti, hag en deus kleuzet ha toullet-don ha lakaet an diazez war ar roc'h. Deuet eo an doureier bras; en em daolet ar froud-dour ouzh an ti-se, met n'en deus ket gallet e fiñval, gant ar mat ma oa bet savet. ⁴⁹ An hini avat a selaou ha na ra ket diouzh se, a zo heñvel ouzh un den hag en deus savet un ti war an douar, hep diazez ebet. Outañ eo en em daolet ar froud-dour, ha kerkent ez eo kouezhet en e boull, ha bras eo bet dismantr an ti-se.

Pare mevel kantener Kafarnaoum.

⁷ ¹ P'en devoe peurlavaret an holl gomzoù-se ouzh divskouarn ar bobl, e tistroas Jezuz da Gafarnaoum. ² Hogen ur c'hantener a oa klañv e servijer ha tost da vervel; hag e garout a rae kenañ. ³ O vezañ klevet komz diwar-benn Jezuz, e kasas d'e gaout un nebeut Henaourien eus ar Yuzevien, da c'houlenn digantañ dont da saveteiñ e vevel. ⁴ Ar re-mañ degouezhet gant Jezuz en aspede start, en ur lavarout dezhañ : «Dellezek eo e rafes kement-se evitañ, ⁵ rak karout a ra hor broad : eñ eo en deus savet dimp ar sinagogenn.» ⁶ Jezuz eta a yeas ganto N'edo ken pell diouzh an ti, pa gasas ar c'hantener un nebeut mignoned da lavarout dezhañ : «Aotrou, arabat dit en em ziaezañ, rak n'on ket din e teufes dindan va zoenn. ⁷ Setu perak n'em eus ket kredet mont va-unan betek ennout. Met lavar ur gêr ha pareet e vo va mevel. ⁸ Rak me ivez va-unan, daoust ma'z on dindan c'halloud un all, am eus soudarded dindanon, ha pa lavaran da unan : Kae ! ez a; ha d'unan all : Deus ! e teu; ha d'am mevel : Gra kement-mañ ! e ra. ⁹ O vezañ klevet ar c'homzoù-se, e voe Jezuz estlammet gantañ; hag o treiñ ouzh ar bobl a oa ouzh e heul, e lavaras : «Me lavar deoc'h, zoken en Israel, n'em eus kavet ken bras feiz.» ¹⁰ Pa zistroas ar gannaded d'an ti, e kavjont ar mevel yac'h.

Dasorc'h mab intañvez Naim.

¹¹ Hag e c'hoarvezas da c'houde, ma'z eas Jezuz d'ur gêr anvet Naim; ha gantañ e oa oc'h ober hent e ziskibien hag ur bobl a dud. ¹² Evel ma tostae ouzh dor ar gêr-se, setu ma oa kaset d'ar bez un den marv, mab pennhêr e vamm, hag intañvez e oa homañ. Hag ur bern tud eus kêr a oa ganti. ¹³ An Aotrou ouzh he gwelout a voe teneraet e galon outi, hag a lavaras dezhi : «Na ouel ket ! » ¹⁴ Tostaat a reas ha stekiñ ouzh an arched; an dougerien a chomas a-sav. Ha neuze e lavaras : «Den yaouank, me lavar dit, sav !» ¹⁵ Hag an den marv da sevel en e goazez ha da stagañ da gomz. Ha Jezuz en roas en-dro d'e vamm. ¹⁶ Aon a grogas en holl dud-se ha dougen a raent klod da Zoue en ur lavarout : «Ur profed bras a zo savet en hon touez, deuet eo Doue da welout e bobl.» ¹⁷ Hag ar vrud-se diwar-benn Jezuz en em skignas dre Youdea a-bezh, ha dre an holl vro tro-war-dro.

Ar gannaded a-berzh Yann.

¹⁸ Degemennet e voe da Yann gant e ziskibien an holl draoù-se. Ha Yann o vezañ galvet daou anezho, ¹⁹ o c'hasas da gaout an Aotrou, da c'houlenn digantañ : «Ha te eo an hini a zle donet, pe un all hon eus da c'hortoz?» ²⁰ En em gavet en e gichen, e lavaras ar wazed-se dezhañ : «Yann Vadezour en deus hor c'haset davedout da c'houlenn : Ha te eo an hini a zle donet, pe un all hon eus da c'hortoz?» ²¹ D'an ampoent e pareas Jezuz kalz a dud diouzh o c'hleñvedoù, o nammoù, hag o drouksperedoù, ha da galz a dud dall e taskoras gras ar gweled. ²² Ma respontas eta dezho :

«It da zegemenn da Yann ar pezh hoc'h eus gwelet ha klevet : an dalled a wel, ar re gamm a gerzh, ar re lovr a zo glanaet, ar re vouzar a glev, ar re varv a adsav da vev, hag ar beorien a zo prezeget dezho ar c'heloù mat. ²³Hag eürus an neb na vin ket un droukskoilh evitañ !»

Yann meulet gant Jezuz.

²⁴ Hag aet kannaded Yann dioutañ, ec'h en em lakaas Jezuz da lavarout d'ar bobl diwar-benn Yann : «Da welout petra oc'h aet d'ar gouelec'h? Ur gorzenn brallet gant an avel? ²⁵Met petra oc'h aet da welout? Un den gwisket gant dilhad flour? Hogen ar re a wisk dilhad lorc'hus hag a vev er blijadurezh a vez kavet e palezioù ar rouaned. ²⁶Met petra oc'h aet da welout? Ur profed? Ya ! me lavar deoc'h, ha muioc'h eget ur profed. ²⁷Hennezh eo an hini a zo bet skrivet diwar e benn :

*Setu ma kasan va c'hannad dirazout,
evit ma kempenno an hent evidout.*

²⁸ Me lavar deoc'h, e-touez bugale ar gwraez, evit brasoc'h eget Yann, n'eus den ebet. Ha padal, an disterañ e Rouantelezh Doue a zo brasoc'h egetañ. ²⁹ An holl bobl o vezañ e glevet, hag ar publikaned o-unan, o deus diogelet reizhded da Zoue, dre resev badeziant Yann. ³⁰ Ar Farizianed avat, hag al lezenourien o deus kaset da netra mennad Doue diwar o fenn, o chom hep resev e vadeziant. ³¹ Ouzh piv eta keñveriañ tud ar remziad-mañ? Ouzh piv ez int heñvel? ³² Heñvel ez int ouzh paotredigoù azezet war ar blasenn hag oc'h hopal an eil re d'ar re all : Fleütet hon eus deoc'h ha n'hoc'h eus ket dañset, klemmganet hon eus deoc'h ha n'hoc'h eus ket leñvet. ³³ Rak deuet eo Yann Vadezour : ne zebr ket bara, ne ev ket gwin, hag e lavarit : Un diaoul zo ennañ. ³⁴ Deuet eo Mab an Den o tebriñ, oc'h evañ, hag1083 e lavarit : Setu ur gwall-debrer hag ul lonker gwin, mignon d'ar publikaned ha d'ar bec'herien. ³⁵ Ar Furnez avat a zo bet testeniet he reizhded dezhi gant he bugale.»

Jezuz hag ar bec'herez keuzidik.

³⁶ Unan eus ar Farizianed en pedas da zebriñ gantañ. Antreet e ti ar Farizian en em lakaas ouzh taol. ³⁷ Ha sed ur vaouez, ur bec'herez eus kêr, pa-z anavezaz edo Jezuz ouzh taol e ti ar Farizian a gemeras ul lestr alabastr leun a c'hwezh-vat; ³⁸ hag oc'h en em lakaat a-dreñv, e-harz e dreid, en ur ouelañ, e krogas da c'hlebiañ e dreid gant he daeroù, hag o sec'he gant he blev, ha pokat a rae d'e dreid ha skuilhañ warno an eoul frondus. ³⁹ O welout kement-se, ar Farizian hag en devoa e bedet, a lavare ennañ e-unan : «Hemañ ma vefe un diouganer, ec'h oufe piv ha petra eo ar vaouez-se a stok outañ : ur bec'herez !» Met Jezuz o respont a lavaraz dezhañ : «Simon, un dra am eus da lavarout dit.» - «Lavar, Mestr !» emezañ. ⁴¹ «Bez' e oa ur c'hredour hag en devoa daou zleour : unan anezho a zlee dezhañ pemp kant diner hag egile hanter-kant. ⁴² Pa n'o devoa ket peadra da zaskoriñ dezhañ e roas dezho o-daou diskarg eus o dle. Pehini anezho eta en karo ar muiañ?» ⁴³ Simon a respontas : «Me a gav din ez eo an hini a zo bet distaolet ar muiañ dezhañ.» - «Barnet mat ac'h eus», eme Jezuz dezhañ. ⁴⁴ Hag o treiñ war-zu ar vaouez, e lavaraz da Simon : «Gwelout a rez ar vaouez-mañ? Antreet on ez ti, met dour ebet n'ac'h eus skuilhet din war va zreid. Hi avat gant he daeroù he deus glebiet va zreid, ha gant he blev he deus o sec'het. ⁴⁵ Pok ebet n'ac'h eus roet din, hi avat abaoe ma'z on antreet, n'eo ket paouezet a bokat d'am zreid. ⁴⁶ Eoul ebet n'ac'h eus skuilhet war va fenn, hi avat eo louzoù c'hwezh-vat he deus skuilhet war va zreid. ⁴⁷ Setu perak,

me lavar dit, eo distaolet dezhi he fec'hedoù, he fec'hedoù niverus, o vezañ m'he deus karet kalz. Hogen an hini a bardoner nebeut dezhañ, a gar nebeut ivez.» ⁴⁸ Neuze e lavaras d'ar vaouez : «Pardonet eo da bec'hedoù.» ⁴⁹ M'en em lakaas ar gouvidi da lavarout enno o-unan : «Piv eo hemañ hag a zistaol zoken ar pec'hedoù?» ⁵⁰ Met eñ a lavaras d'ar vaouez : «Da feiz he deus da salvet, kae e peoc'h.»

Gwragez santel o heuliañ Jezuz.

8 ¹ Da c'houde, Jezuz a rae hent a-dreuz kêrioù ha bourc'hioù en ur brezeg hag en ur embann keloù mat Rouantelezh Doue. Gantañ e oa an Daouzek, ² hag un nebeut merc'hed, bet paret diouzh speredoù-drouk ha diouzh gwanderioù : Mari lesanvet Madalen, hag a oa aet seizh diaoul diouti, ³ ha Ioanna, gwreg Kousa, merour Herodez, ha Suzanna, ha kalz a re all a roe skoazell dezho diwar o feadra.

Parabolenn an hader.

⁴ Evel m'en em zastume ur bobl vras a dud, ha ma tereded d'e gaout eus a bep kêr, e lavaras dre barabolenn : ⁵ «An hader a yeas er-maez da hadañ e had. Ha tra ma hade, un darn a gouezhas a-hed an hent : mac'het e voent dindan an treid ha debret gant laboused an neñv; ⁶ darn all a gouezhas war ar roc'h, hag a-vec'h diwanet e tisec'hjont dre n'o devoa ket a c'hlebor; ⁷ darn all a gouezhas e-mesk an drein, hag an drein o kreskiñ a-unan ganto o mougas; ⁸ ha darn all a gouezhas en douar mat, hag o vezañ diwanet, e taoljont frouezh kant gwezh o c'hement all.» o lavarout se e youc'he : «Ra glevo an hini en deus divskouarn da glevout !»

⁹ E ziskibien a c'houlennas outañ petra a dalveze an heñveladur-se. ¹⁰ Eñ a respontas : «Deoc'h eo bet roet anaout kevrinoù Rouantelezh Doue, d'ar re all avat, dindan heñveladurioù, ma chomint hep gwelout goude sellout, hag hep kompren goude klevout. ¹¹ Setu eta petra a dalvez an heñveladur : an had eo komz Doue. ¹² Ar re a zo a-hed an hent eo ar re a glev, nemet e teu an diaoul goude-se hag e lam kuit ar gomz diouzh o c'halonoù, gant aon na vefent salvet o krediñ. ¹³ Ar re a zo war ar vein eo ar re a glev ar gomz hag he degemer gant levez, nemet ar re-mañ n'o deus ket gwrizioù : krediñ a reont evit ur pennad, hogen da goulz an temptadur e tec'hont. ¹⁴ Ar pezh a zo kouezhet e-mesk an drein, ar re-se eo ar re o deus klevet, met o tremen a-dreuz da brederioù, pinvidigezhioù ha plijadurezhioù ar vuhez e vezont mouget ha ne dizhont ket dougen frouezh. ¹⁵ Ar pezh avat a zo en douar mat, ar re-se eo ar re a glev ar gomz gant ur galon laouen ha mat, he mir hag a daol frouezh dre o dalc'husted.

Parabolenn al lamp.

¹⁶ Den ebet n'enaou ul lamp evit e guzhat dindan ul lestr pe dindan ur gwele; hogen war ur c'hantolor en lakaer, d'ar re a zeu e-barzh da welout ar gouloù. ¹⁷ N'eus netra kuzhet na vo ket dizoloet; na netra disgwel na vo ket diskuliet ha lakaet a-wel d'an holl. ¹⁸ Taolit evezh eta penaos e selaouit, rak an neb en deus e vo roet dezhañ, hag an neb n'en deus ket e vo lamet digantañ zoken ar pezh a gav dezhañ kaout en e gerz.»

Kerent Jezuz hervez ar gwad hag hervez ar spered.

¹⁹ Dont a reas e vamm hag e vreudeur d'e gaout, ha n'hellent ket mont betek ennañ en abeg d'an engroez. ²⁰ Ma voe kemennet dezhañ : «Da vamm ha da vreudeur a zo er-maez, hag e klaskont da welout.» ²¹ Met eñ a respontas dezho : «Va mamm ha va breudeur, ar re-se int ar re a selaou komz Doue hag a ra diouti.»

Ar gorventenn sioulaet.

²² Un deiz e c'hoarvezas gantañ pignat en ur vag gant e ziskibien hag e lavaras dezho : «Treizhomp war an tu all d'al Lenn.» Hag ez ejont war-zu ar maez. ²³ E-pad ma treizhent, e vanas kousket. Hag e kouezhas ur barr-avel war al Lenn; ar vag a oa karget gant an dour hag en argoll e oant. ²⁴ Hag i da dostaat ha d'e zihuniñ : «Mestr, Mestr, emezo, emeomp o vont da goll.» Hag eñ o tihuniñ a c'hourdrouzas d'an avel ha da drefu ar mor : sioulaat a reas hag e teuas kalmijenn. ²⁵ Neuze e lavaras dezho : «Pelec'h emañ ho feiz?» Spontet ha sebezet e oant hag e lavarent kenetrezo : «Piv eo hemañ pa c'hourc'hemenn d'an avelioù ha zoken d'an dour ha pa sentont outañ?»

Den diaoulek Gerasa.

²⁶ Douarañ a rejont e Bro-C'herasa a zo rag-enep da Vro-C'halilea. ²⁷ Ha pa voe diskennet d'an douar, e teuas war-arbenn dezhañ un den eus kêr a oa drouk-speredet; pell amzer a oa n'en devoa douget gwiskamant ebet, ne veve ket en un ti, hogen er beziou. ²⁸ O welout Jezuz, e krogas da leuskel kriadennoù hag o kouezhañ ouzh e dreid e lavaras gant ur vouezh kreñv : «Petra 'glaskez ouzhin, Jezuz, Mab an Doue meurbet-uhel? Me az ped, n'am bourev ket.» ²⁹ Rak Jezuz a c'hourc'hemenne d'ar spered hudur mont er-maez eus an den-se. Meur a wezh e oa bet taget gant ar spered-se, ha daoust ma veze ereet gant chadennoù ha dalc'het gant hualoù, e torre e ereoù, hag an diaoul er c'hase d'ar gouelec'hioù. ³⁰ Jezuz a c'houlennas outañ : «Peseurt anv ac'h eus-te?» Hag e respontas : «Armead», emezañ, rak aet e oa ennañ kalz a speredoù drouk. ³¹ Hag en aspediñ a raent evit na c'hourc'hemennje ket dezho distreiñ d'an islonk. ³² Hag eno e oa ur bagad bras a voc'h o peuriñ war ar menez. En aspediñ a rejont evit ma'z aotreje dezho mont e-barzh ar re-se, hag ez aotreas dezho. ³³ An drouksperedoù o vont er-maez eus an den da antren e-barzh ar moc'h; hag ar bagad d'en em strinkañ diwar an tornaod e dour al Lenn, ma voent beuzet. ³⁴ O welout petra a oa c'hoarvezet, e tec'has ar vêsærien kuit, hag e tegemennjont ar c'heloù-se e kêr ha war ar mæzioù. ³⁵ Deredek a reas an dud da welout hag e teujont da gaout Jezuz. Kavout a rejont an den ma oa aet an diaouled er-maez anezhañ, gwisket ha gant e skiant-vat, en e goazez ouzh treid Jezuz, ha spontet e voent. ³⁶ An testoù a zanevellas dezho penaos e oa bet paret an den drouksperedet. ³⁷ Neuze holl dud Bro-C'herasa a c'houlennas digant Jezuz mont diouto, rak ur spont bras a oa aet enno. Pignat a eure er vag evit mont en-dro war e giz. ³⁸ Met an den hag a oa aet an diaouled er-maez anezhañ, en pede d'e lezel da chom gantañ. Met Jezuz a guitaas dioutañ en ur lavarout dezhañ : ³⁹ «Distro d'az ti, ha displeg kement en deus graet Doue ez-keñver.» Mont a reas kuit eta en ur embann dre gêr a-bezh kement en devoa graet Jezuz en e geñver.

Ar vaouez gant an diwadañ. Merc'h Jairoz.

⁴⁰ Pa zistroas Jezuz, e voe degemeret gant ur bobl a dud, rak holl edont ouzh e c'hortoz. ⁴¹ Ha setu ma teuas un den anvet Jairoz, hag a oa e penn ar sinagogenn. Kouezhañ a reas e-harz treid Jezuz hag e bediñ da zont d'e di. ⁴² Rak ur verc'h pennehêrez en devoa, dezhi un daouzek vloaz bennak, hag hi war he zremenvan. P'edo Jezuz o vont di, ar bobl en mouge. ⁴³ Ha neuze ur vaouez klañv gant an diwadañ abaoe daouzek vloaz hep n'he dije gallet bezañ gwellaet gant den ebet, ⁴⁴ o dostaas outañ a-ziadreñv, hag a stokas ouzh bevonn e vantell : war an taol e paouezas an diwadañ. ⁴⁵ Met Jezuz da lavarout : «Piv en deus stoket ouzhin?» Pa nac'he an holl, e respontas Pêr; «Mestr, ur bobl a dud a zo ouzh da waskañ ha da flastrañ.» ⁴⁶ Hogen Jezuz a lavaras : «Unan bennak en deus stoket ouzhin, rak gouezet em eus-me e oa aet un nerzh diouzhin.» ⁴⁷ Ar vaouez o welout e oa spurmantet, a zeuas en ur grenañ d'en em deurel ouzh e dreid, ha dirak an holl dud ec'h anzavas perak he devoa stoket outañ, ha penaos e oa bet pareet war an taol. ⁴⁸ Eñ avat a lavaras dezhi : «Va merc'h, da feiz he deus da salvet, kae war-raok e peoc'h !»

⁴⁹ Edo c'hoazh o komz, pa zeuas unan bennak da gaout mestr ar sinagogenn da lavarout dezhañ : «Marv eo da verc'h, arabat diaezañ ar mestr pelloc'h.» ⁵⁰ Jezuz hag en devoa klevet, a respontas dezhañ : «Na spont ket, kred hepken, hag e vo salvet.» ⁵¹ Pa 'n em gavas en ti, ne lezas den ebet da vont e-barzh gantañ, nemet Pêr, Yann ha Jakez, ha tad ha mamm ar bugel. ⁵² An holl avat a oa o ouelañ hag oc'h ober kañv dezhi : «Na ouelit ket, eme Jezuz; n'eo ket marv, met o kousket emañ.» ⁵³ Goap a raent outañ o c'houzout mat e oa marv. ⁵⁴ Hag eñ o vezañ kroget en he dorn a lavaras kreñv : «Va bugel, dihun !» ⁵⁵ Hag ar vuhez a addeuas enni; sevel a reas war an taol, ha Jezuz a c'hourc'hemennas reiñ dezhi da zebriñ. ⁵⁶ Sebezet e chomas he c'herent. Eñ avat a zifennas outo lavarout da zen ar pezh a oa c'hoarvezet.

Prezegerezh an Ebestel.

9 ¹ O vezañ galvet an Daouzek war un dro, e roas dezho galloud ha beli war an holl drouksperedoù ha galloud da bareañ ar c'hleñvedoù. ² Hag o c'has a reas da embann Rouantelezh Doue, ha da yac'haat ar re glañv. ³ Lavarout a eure dezho : «Na gemerit netra ganeoc'h evit an hent, na bazh, na bisac'h, na bara, nag arc'hant, hag arabat deoc'h kaout pep a ziv doneg. ⁴ E pe di bennak ma'z eot, chomit eno betek ma'z eot kuit ac'hano. ⁵ Hag evit ar re n'ho tegemerfent ket, it er-maez eus o c'hêr, ha hejit ar poultr diwar ho treid, e testeni en o enep.» ⁶ Mont a rejont eta ha tremen dre ar bourc'hioù en ur embann ar C'heloù mat hag en ur yac'haat e pep lec'h.

Nec'h Herodez.

⁷ Klevout a reas Herodez an tetrark kement a dremene, ha ne ouie ket kaer petra da soñjal, rak darn a lavare e oa adsavet Yann a-douez ar re varv, ⁸ ha darn all e oa en em ziskouezet Elia, ha darn all c'hoazh e oa dasorc'het unan eus ar brofeded kozh. ⁹ Hag e lavare Herodez : «Yann am eus graet dibennañ; piv eta eo hemañ hag a glevan kement-se diwar e benn?» Hag e klaske e welout.

Ar bara kresket.

¹⁰ Pa zistroas an Ebestel e kontjont dezhañ kement o devoa graet. Hag o kemerout a reas gantañ evit en em dennañ en ul lec'h digenvez war-zu ur gêr anvet Betsaida. ¹¹ Met ar bobl o vezañ klevet kement-se, a yeas war e lerc'h. o degemerout a reas hag e komzas outo diwar-benn

Rouantelezh Doue, hag e pareas ar re o devoa ezhomm da vezañ yac'haet. ¹² Edo an deiz war e ziskar. Tostaat a reas an Daouzek da lavarout dezhañ : «Kas kuit an dud, ma'z aint d'ar c'hêriadennou ha d'ar mereurioù diwar-dro, da lojañ ha da glask boued. Rak amañ emomp en ul lec'h digenvez.» ¹³ Lavarout a reas dezho : «C'hwi hoc'h-unan, roit dezho da zebriñ.» Int a respontas : «N'eus ket ganimp ouzhpenn pemp baraenn ha daou besk, nemet ez afemp ni hon-unan da brenañ boued evit an holl dud-se.» ¹⁴ Ur pemp mil bennak a baotred a oa anezho. Neuze e lavaras d'e ziskibien : «Lakait-i da azezañ a strolladoù a hanter-kant den bennak.» ¹⁵ Evel-se e rejont hag e lakjont an holl da azezañ. ¹⁶ O kemerout neuze ar pemp baraenn hag an daou besk, hag o sevel e zaoulagad etrezek an Neñv, e lavaras ur vinnigadenn, o rannas hag o roas d'e ziskibien da ingaliñ d'an dud. ¹⁷ Debrñ a rejont holl o gwalc'h, hag eus an tammou a vanas en o dilec'h e voe dastumet daouzek panerad.

Pêr a zisklêr e feiz. Diougan kentañ ar Basion.

¹⁸ Un deiz ma oa Jezuz o pediñ en e bart, e oa gantañ e ziskibien hag eñ a c'houlennas outo : «Piv a lavar an dud ez on-me? ¹⁹ Int a respontas : «Yann Vadezour; pe re all a lavar Elia; ha re all c'hoazh unan eus ar brofeded kozh dasorc'het.»- ²⁰ «Ha c'hwi, emezañ, piv a lavarit ez on-me?» Ha Pêr da respont : «Krist Doue.» ²¹ Met eñ gant gourdrouz a zifennas outo diskuliañ kement-se da zen ebet, ²² hag e lavaras : «Ret eo da Vab an Den gouzañv kalz, ha bezañ distaolet gant an Henaourien, an Arc'h-veleien hag ar Skribed, ha bezañ lakaet d'ar marv hag adsevel da vev d'an trede deiz.»

An emnac'h da c'hounit ar Rouantelezh.

²³ Lavarout a rae d'an holl : «Ma fell da unan bennak donet war va lerc'h, ra en em zinac'ho e-unan, ra sammo bemdez e groaz, ha ra zeuy d'am heul. ²⁴ Rak an neb a venn saveteiñ e vuhez, he c'hollo, met an neb a gollo e vuhez abalamour din-me, hennezh he savetaio. ²⁵ Da betra e talvez d'un den gounit ar bed a-bezh, mar en em goll e-unan pe mar bez kastizet? ²⁶ Rak an neb en devo bet mezh ac'hanon hag eus va c'homzoù, hennezh en devo Mab an Den mezh anezhañ. ²⁷ Me lavar deoc'h e gwirionez, tud zo eus ar re a zo amañ na dañvaint ket ar marv, ken n'o devo gwelet Rouantelezh Doue.»

Treuzneuziadur Jezuz.

²⁸ Un eizh deiz bennak goude ar c'homzoù-se, e kemeras gantañ Pêr, Yann ha Jakez, hag e pignas war ar menez da bediñ. ²⁹ Ha tra ma pede, e voe kemmet e zremm, hag e teuas e zilhad da vezañ gwenn-kann ha lugernus. ³⁰ Ha setu o tivizout gantañ daou zen a oa Moizez hag Elia, ³¹ hag int oc'h en em ziskouez er c'hlod a gomze eus e "ermaeziadenn" a oa da vezañ kaset gantañ da benn e Jeruzalem. ³² Pêr hag ar re a oa gantañ, a oa og gant ar c'houked. o vezañ dihunet, e weljont klod Jezuz, hag an daou zen en em gave gantañ. ³³ Ha p'edo ar re-mañ o vont kuit dioutañ e lavaras Pêr da Jezuz : «Mestr, brav eo dimp bezañ amañ. Greomp teir zeltenn, unan dit-te, un all da Voizez, hag un all da Elia.» Ne ouie ket petra a lavare.

³⁴ Endra ma komze evel-se e teuas ur goabrenn hag e voent goloet gant he skeud. Spontañ a rejont oc'h en em welout o-unan er goabrenn. ³⁵ Hag ur vouezh a zeuas eus ar goabrenn a lavare : «Hemañ eo va Mab, an hini dibabet. Selaouit-eñ.» ³⁶ A-vec'h ma oa sonet ar vouezh, ec'h en em

gavas Jezuz e-unan-penn. Int avat a davas hep kontañ da zen ebet, d'ar c'houlz-se, tra ebet eus ar pezh o devoa klevet.

Pare ar bugel diaoulek.

³⁷ Antronoz p'edont o tiskenn diwar ar menez, e teuas un engroez bras a dud war-arbenn dezhañ. ³⁸ Ha sed un den eus an engroez a youc'has : «Mestr, me az ped, taol ur sell war va mab, rak n'em eus mab nemetañ; ³⁹ ha setu, ur spered a grog ennañ, ha kerkent en laka da yudal; en hejañ a ra garv hag e ra dezhañ eonenniñ; ha gant poan ez a dioutañ ouzh e lezel brevet-holl. ⁴⁰ Pedet em eus da ziskibien d'en argas kuit, met n'o deus ket gallet.» ⁴¹ Jezuz a respontas : «Gouenn difeiz ha fallakr, betek pegoulz e vin ganeoc'h hag e rankin ho kouzañv? Degas da vab amañ.» ⁴² Ne rae c'hoazh nemet tostaat ma voe stlapet d'an douar gant an droukspered ha gwall-hejet gantañ. Jezuz a c'hourc'hemennas d'ar spered hudur, hag eñ da yac'haat ar bugel ha d'en adreiñ d'e dad. ⁴³ Sebezet e oant holl gant meurded Doue. Evel ma vane an holl estlammet gant kement a rae, e lavaras d'e ziskibien : ⁴⁴ «Evidoc'h-c'hwi, mirit ervat en ho tivskouarn ar gerioù-mañ : Mab an Den a zo da vezañ drouklakaet etre daouarn an dud.» ⁴⁵ Int avat ne gomprenent ket ar gomz-se, ha kuzhet e oa outo ma chomfent hep kompren. Ha ne gredent ket ober outañ goulennoù war gement-se.

Tabut war ar vestroniezh.

⁴⁶ Sevel a reas rendael etrezo : daoust pehini a oa ar brasañ anezho. ⁴⁷ Met Jezuz oc'h anaout soñj o c'halonoù a gemeras ur bugel hag en lakaas en e gichen. ⁴⁸ Hag e lavaras dezho : «An neb a zegemer ar bugel-mañ em anv, am degemer va-unan; hag an neb am degemer a zegemer an hini en deus va c'haset. An hini bihanañ en ho touez c'hwi-holl, hennezh eo a zo bras.»

⁴⁹ Neuze Yann a savas e vouezh : «Mestr, emezañ, gwelet hon eus unan oc'h argas an drouksperedoù ez anv, ha miret hon eus outañ d'en ober, rak n'emañ ket ganimp ouzh da heul.» ⁵⁰ Jezuz a respontas outañ : «Arabat herzel outañ. Rak an hini n'emañ ket a-enep deoc'h a zo a-du ganeoc'h.»

Jezuz o vont da Jeruzalem. Samaridi a nac'h en degemerout.

⁵¹ Neuze pa zeue da benn an deizioù ma tlee bezañ savet d'an neñv, Jezuz a lakaas start en e soñj mont da Jeruzalem. ⁵² Kas a reas kannaded en e raok, hag ar re-mañ o vezañ aet en hent, a antreas en ur gêriadenn eus Samaria, da aozañ pep tra evitañ. ⁵³ Met ne voent ket degemeret gant tud ar gêriadenn, dre m'edo Jezuz o vont da Jeruzalem. ⁵⁴ O welout kement-se an diskibien Jakez ha Yann a lavaras : «Aotrou, ha fellout a ra dit e lavarfemp d'an tan diskenn eus an neñv d'o fulluc'hañ?» ⁵⁵ O treiñ war-zu enno e krozas Jezuz dezho. ⁵⁶ Hag ez ejont d'ur gêriadenn all.

Galvidigezh d'an emziouer.

⁵⁷ Pa oant o vont gant o hent e lavaras unan bennak dezhañ : «Da heuliañ a rin da gement lec'h ma'z i.» ⁵⁸ Met Jezuz a respontas dezhañ : «Al lern o deus toulloù, ha laboused an neñv o deus neizhioù. Mab an Den avat n'en deus lec'h ebet da harpañ e benn.»

⁵⁹ D'un all e lavaras : «Deus d'am heul.» Hemañ a respontas : «Mestr, va lez da vont da gentañ da sebeliañ va zad.» ⁶⁰ Jezuz neuze a respontas dezhañ : «Lez ar re varv da sebeliañ ar re

varv. Ha te, kae da gemenn Rouantelezh Doue.» ⁶¹Un all c'hoazh a lavaras : «Mont a rin d'az heul, met da gentañ, va lez da vont da lavarout kenavo d'am zud.» ⁶²Jezuz a respontas dezhañ : «Neb a grog e lost an alar hag a sell a-dreñv, n'eo ket doareet diouzh Rouantelezh Doue.»

Mision an daouzek diskibl ha tri-ugent.

10 ¹Da c'houde, e tibabas an Aotrou daouzek-ha-tri-ugent all hag o c'hasas daou ha daou en e raok, da gement kêr ha lec'h ma tlee mont e-unan. ²Hag e lavaras dezho : «Stank eo an eost, distank avat al labourerien. Pedit eta mestr an eost ma kaso war e eost labourerien. ³It ! Setu m'ho kasan evel deñved e-touez bleizi. ⁴Na zouguit na yalc'h, na sac'h, na botoù; na saludit den ebet war an hent. ⁵E kement ti ma'z eot, lavarit da gentañ : 'Peoc'h d'an ti-mañ'. ⁶Ha ma vez eno un den a beoc'h, e tiskenno ho peoc'h warnañ; mar ne vez ket, e teuy en-dro warnoc'h. ⁷Chomit en hevelep ti, o tebriñ hag oc'h evañ eus ar pezh a vo ganto; rak d'al labourer eo dleet e c'hopr. Na dremenit ket a di da di. ⁸E kement kêr ma'z eot, mar ho tegemerer, debrit ar pezh a vo servijet deoc'h; ⁹pareit ar glañvourien a vo eno, ha lavarit d'an dud : Tost deoc'h emañ Rouantelezh Doue. ¹⁰E kement kêr ma'z eot, mar n'ho tegemerer ket, it war leurioù-kêr ha lavarit : ¹¹Betek poultr ho kêr hag a zo stag ouzh hon treid a dennomp diwarno d'e lezel ganeoc'h; koulskoude gouezit kement-se : tost emañ Rouantelezh Doue. ¹²Me lavar deoc'h, evit Sodom, en deiz-se, ne vo ket ken gwazh hag evit ar gêr-se. ¹³Gwa te, Korazein ! Gwa te, Betsaida ! Rak ma vije bet graet e Tir hag e Sidon ar burzhudoù a zo bet graet ennoc'h, e vijent a bell zo aet d'azezañ el ludu gwisket gant lien-sac'h evit ober pinijenn. ¹⁴Hogen evit Tir ha Sidon, da zeiz ar Varn, ne vo ket ken gwazh hag evidoc'h. ¹⁵Ha te, Kafarnaoum, *na betek an neñv ne vi ket savet? Betek bro ar marv e vi diskennet !*

¹⁶An hini ho selaou am selaou, hag an hini ho tistaol am distaol. Hag an hini am distaol a zistaol an hini en deus va c'haset.»

Distro an daouzek diskibl ha tri-ugent.

¹⁷Distreñ a reas an daouzek-ha-tri-ugent, leun a levenez, o lavarout : «Aotrou, an drouksperedoù o-unan a bleg dimp ez anv.»¹⁸Hag e respontas dezho : «Gwelout a raen Satan o kouezhañ eus an Neñv evel ul luc'hedenn. ¹⁹Setu m'em eus roet deoc'h ar galloud da gerzhout war an naered, hag ar c'hruged, ha beli war holl nerzh an enebour, ha mann ebet ne c'hello noazout ouzhoc'h. ²⁰Koulskoude n'eo ket gant se hoc'h eus da vezañ laouen, e plegfe deoc'h ar speredoù, hogen bezit laouen dre m'emañ skrivet hoc'h anvioù en Neñvoù.»

An Aviel diskuliet d'an dud eeun.

²¹D'an eur-se e tridas gant al levenez er Spered Santel hag e lavaras : «Bennozh a lavaran dit-te, Tad, Aotrou an Neñv hag an douar, dre m'ec'h eus kuzhet an traoù-se ouzh ar re fur ha desket, hag o diskuliet d'ar vugaligoù. Ya, Tad, rak evel-se eo bet plijet dit. ²²Pep tra a zo bet roet din gant va Zad, ha den ebet ne anavez an Tad, nemet ar Mab hag an neb a blij d'ar Mab en diskuliañ dezhañ.» ²³Hag o treiñ ouzh e ziskibien, e lavaras dezho en o fart o-unan : «Eürus an daoulagad a wel ar pezh a welit. ²⁴Me lavar deoc'h : kalz profeded ha rouaned o deus bet c'hoant da welout ar pezh a welit, ha n'o deus ket gwelet, ha da glevout ar pezh a glevit, ha n'o deus ket klevet.»

Parabolenn ar Samaritan mat.

²⁵ Ha setu ma savas un doktor war al Lezenn hag a lavaras dezhañ evit en amprouiñ : «Mestr, petra am eus d'ober a-benn kaout ar vuhez peurbadel da lod?» ²⁶ Respont a reas Jezuz dezhañ : «El Lezenn, petra a zo skrivet? Penaos e lenne?» ²⁷ Hag hemañ da respont : «*Karout a ri an Aotrou, da Zoue, gant da holl galon ha gant da holl ene ha da holl nerzh* ha da holl spered, *ha da nesañ evel dout da-unan.*» - ²⁸ «Mat-kaer ac'h eus respontet, eme Jezuz dezhañ, gra kement-se hag e vevi.» ²⁹ Hemañ avat, o klask en em zidamall, a lavaras da Jezuz : «Ha piv eo va nesañ?» ³⁰ Ha Jezuz a stagas da lavarout : «Un den a oa o tiskenn eus Jeruzalem da Yeriko, hag e kouezhas etre daouarn al laeron : ar re-mañ hen diwiskas, hen brevas a-daolioù hag a yeas kuit ouzh e lezel hanter-varv. ³¹ Dre zegouezh, setu ur beleg o tiskenn dre an hent-se : ouzh e welout e tremenas dre an tu all eus an hent. ³² En hevelep stumm, ul Leviad erruet war an dachenn, ouzh e welout ivez a dremenas dre ar c'hostez all. ³³ Hogen ur Samariad hag a oa o veajiñ, a zegouezhas en e gichen hag ouzh e welout e voe karget e galon a druez. ³⁴ Tostaat a reas, lienañ e c'houlioù en ur skuilh warno eoul ha gwin; da c'houde en savas war gein e loen e-unan hag e gas a reas d'un ostaleri, hag e kemeras preder outañ. ³⁵ Antronoz, e tennas daou ziner eus e yalc'h evit o reiñ d'an ostiz en ur lavarout : Kemer preder anezhañ, ha kement a zispigni en tu-hont, a zaskorin-me dit, pa zeuin en-dro. ³⁶ Pehini eus an tri-se, a gav dit, a zo bet nesañ an den kouezhet etre daouarn al laeron?» ³⁷ Respont a reas : «An hini a zo bet trugarezus en e geñver.» Ha Jezuz neuze da lavarout dezhañ : «Kae ha te ivez, gra heñvel !»

Marta ha Maria.

³⁸ E-kerzh o beaj, ec'h antreas en ur vourc'h, hag ur vaouez, Marta hec'h anv, hen degemeraz en he zi. ³⁹ Ur c'hoar he devoa, anvet Maria, hag homañ o vezañ aet da azezañ ouzh treid an Aotrou, a selaoue e gomzoù. ⁴⁰ Marta avat, a oa prederiet gant ar pres-labour. Hag hi o chom a-sav da lavarout : «Mestr, ha ne rez forzh m'am lez va c'hoar d'ober va-unan-penn war-dro al labour? Lavar dezhi eta donet d'am sikour.» - ⁴¹ «Marta ! Marta !, a respontas an Aotrou dezhi, nec'het out hag e veskez war-dro kalz a draoù; nebeut a draoù koulskoude a zo ezhomm, unan hepken; ⁴² Maria he deus dibabet al lodenn wellañ ha ne vo ket lamet diganti.»

Ar Bater.

11 ¹ Un deiz ma oa en ul lec'h bennak o pediñ, echu gantañ e bedenn, e lavaras dezhañ unan eus e ziskibien : «Mestr, desk dimp pediñ evel m'en deus Yann e-unan desket d'e ziskibien.» ² Hag e lavaras dezho : «Pa bedot, lavarit :

Tad, ra vo santelaet da anv,
 Ra zeuio da Rouantelezh;
³ bara hor bevañs, en ro dimp bemdez;
⁴ Distaol dimp hor pec'hedoù,
 rak ni hon-unan ivez a zistaol
 da gement hini a zle dimp;
 Ha mir n'afemp da heul an temptadur.»

Parabolenn ar mignon hegazus.

⁵ Hag e lavaras dezho : «Piv ac'hanoc'h mar en deus ur mignon, ha mar deu d'e gaout da hanternoz da lavarout dezhañ : Va mignon, prest din tri baraig, ⁶ rak ur mignon din a zo du-mañ diwar veajiñ, ha n'em eus netra da ginnig dezhañ; ⁷ ha ma respont egile eus an diabarzh : Na dorr ket din va fenn; prenet eo an nor bremañ, hag emañ va bugale ganin en hor gwele, n'hellan ket sevel da reiñ dit; ⁸ me lavar deoc'h, ha pa ne savfe ket da reiñ dezhañ dre ma'z eo e vignon, e savo evelkent dre forzh bezañ tregaset gantañ, hag e roio dezhañ kement en deus ezhomm.

Nerzh ar bedenn.

⁹ «Ha me a lavar deoc'h : Goulennit hag e vo roet deoc'h; klaskit hag e kavot, skoit hag e vo digoret deoc'h. ¹⁰ Rak an neb a c'houlenn a resev, an neb a glask a gav, hag an neb a sko, e vo digoret dezhañ. ¹¹ En ho touez, pehini eo an tad a rofe ur maen d'e vab mar goulennfe bara digantañ? Pe mar goulennfe ur pesk daoust hag e-lec'h pesk eo un naer a rofe dezhañ? ¹² Ha mar goulennfe ur vi, daoust hag e rofe dezhañ ur grug? ¹³ C'hwi eta, evidoc'h da vezañ fall, mar gouzoc'h reiñ traoù mat d'ho pugale, na pegen muioc'h ne roio ket an Tad eus an Neñv ar Spered Santel d'ar re a c'houlennno.»

Rouantelezh an Neñv a zo enebiezh ouzh an diaoul.

¹⁴ Edo oc'h argas un droukspered hag hemañ a oa mut. Neuze pa oa aet an droukspered kuit, e komzas an den mut. Ma vanas ar bobl sebezet. ¹⁵ Hiniennou avat, a lavaras : «Dre nerzh Beelzeboul, priñs an drouksperedoù, eo ec'h argas an drouksperedoù.» ¹⁶ Re all evit e demptañ, a c'houlenne digantañ un arouez eus an Neñv. ¹⁷ Eñ avat oc'h anavezout o soñjoù, a lavaras dezho : «Pep rouantelezh disrannet a-enep dezhi hec'h-unan, a ya da goll, hag an tiez anezhi a gouezh neuze an eil war egile. ¹⁸ Mard-emañ ivez rouantelezh Satan disrannet a-enep dezhi hec'h-unan, penaos e chomo en he sav? peogwir e lavarit ez eo dre nerzh Beelzeboul ec'h argasan-me an drouksperedoù. ¹⁹ Ha mard eo dre Beelzeboul ec'h argasan-me an drouksperedoù, ho mibien-c'hwi, dre biv o argasant? Dre-se int o-unan a vo ho parnerien. ²⁰ Met mard eo dre viz Doue ec'h argasan an drouksperedoù, neuze eo deuet evidoc'h Rouantelezh Doue. ²¹ P'emañ an den kreñv hag armet-mat o tiwall e di, emañ e peoc'h kement en deus. ²² Met ma c'hoarvez d'unan all kreñvoc'h egetañ dont da drec'hiñ warnañ, e lamo digantañ an armoù ma fizie enno, hag e lodenno e zibourc'hioù. ²³ An hini n'emañ ket ganin a zo a-enep din, hag an hini na zastum ket ganin a vez o forañ.

²⁴ «Pa 'z a ar spered hudur er-maez eus an den, e kante dre lec'hioù dizour o klask diskuizh; ha pa chom hep kaout, e lavar : Distreiñ a rin d'am zi, ez on aet er-maez anezhañ. ²⁵ Ha pa zegouezh, e kav an ti skubet ha kempennet. ²⁶ Neuze ez a da glask seizh spered all droukoc'h egetañ; hag antreet e-barzh, e reont o chomadur ennañ, ha stad diwezhañ an den-se a zeu da vezañ gwashoc'h eget an hini gentañ.» ²⁷ Ha neuze, endra ma lavare kement-se, setu ur vaouez o sevel he mouezh eus a-douez ar bobl, a lavaras : «Eürus ar c'horf en deus da zouget hag an divronn ac'h eus sunet.» ²⁸ Eñ avat a respontas : «Eürus muioc'h c'hoazh ar re a selaou komzoù Doue hag o mir.»

Arouez Yonas.

²⁹ Evel ma teue ar bobl stankoc'h-stankañ, e krogas da lavarout : «Ur rummad fall eo ar rummad-mañ. Ur sin emañ o c'houlenn, hag arouez ebet ne vo roet dezhañ estreget arouez Yonas. ³⁰Evel ma voe Yonas un arouez evit Niniveiz, evel-se e vo ivez Mab an Den evit ar rummad-mañ. ³¹Rouanez ar C'hreisteiz a adsavo da zeiz ar varn gant gwazed ar rummad-mañ hag o c'hondaono. Rak donet a reas eus penn pellañ an douar da selaou furnez Salomon, ha setu, brasoc'h eget Salomon a zo amañ. ³²Gwazed Ninive a savo en o sav da zeiz ar varn gant tud ar rummad-mañ hag o c'hondaono; rak pinijenn a rejont o klevout Yonas, ha setu, brasoc'h eget Yonas a zo amañ.»

Parabolenn ar gouloù.

³³ Den ebet n'enaou ur gouloù evit e lakaat en ul lec'h kuzh, pe dindan ar boezell, hogen war ar c'hantolor, d'ar re a zeu e-barzh da welout ar gouloù. ³⁴ Lamp da gorf eo da lagad. Mard eo naet da lagad, eo ivez da gorf a-bezh a vo goulaouet. Mard eo fall, e vo da gorf ivez en deñvalijenn. ³⁵ Sell eta na vo ket teñvalijenn ar gouloù a zo ez kreiz. ³⁶ Mar bez goulaouet da gorf a-bezh, hep tamm lodenn ebet anezhañ en deñvalijenn, e vo sklêrijennet en e bezh evel pa vez al lamp ouzh da sklêrijennañ gant e sked.»

Jezuz o kondaoniñ ar Farizianed ha Doktored an Lezenn.

³⁷ A-greiz ma komze, setu m'en pedas ur Farizian da leinañ en e di. Jezuz o vezañ antreet en em lakaas ouzh taol. ³⁸ Met ar Farizian o welout se a voe souezhet, o vezañ ma ne oa ket en em walc'het a-raok ar pred. ³⁹ Ma lavaras an Aotrou dezhañ : «Setu c'hwi, ar Farizianed, naetaat a rit diavaez an hanaf hag ar plad, hogen ho tiabarzh-c'hwi a zo leun a laeroñsi hag a zrougiezh. ⁴⁰ Tud diboell ! Daoust hag an hini en deus graet an diavaez n'en deus ket graet ivez an diabarzh? ⁴¹ Hervez ma c'hellit, grit aluzon, ha neuze e vo glan pep tra evidoc'h. ⁴² Hogen gwa c'hwi, Farizianed, o vezañ ma paeit an deog diwar ar vent hag ar ruz, ha diwar an holl louzoù, e-keit ma lezit a-gostez ar reizhded ha karantez Doue. Kement-mañ a oa d'ober, hep dilezel kement-se. ⁴³ Gwa c'hwi, Farizianed, o vezañ ma plij deoc'h ar c'hadoriou kentañ er sinagogennoù hag ar saludoù war ar plasenoù. ⁴⁴ Gwa c'hwi o vezañ ma'z oc'h evel ar beziou-se n'eus netra ouzh o diskouez, ma kerzh an dud warno hep gouzout dezho.» ⁴⁵ Neuze, unan eus Doktored al Lezenn a savas e vouezh da lavarout dezhañ : «Mestr, o komz evel-se eo ni ivez a zismegañsez.» ⁴⁶ Eñ a respontas : «C'hwi ivez, Doktored al Lezenn, gwa c'hwi, dre ma sammit war an dud bec'hiou gwall-bounner da zougen; e-keit na stokit ket hoc'h-unan ouzh ar sammoù-se gant unan eus ho pizied. ⁴⁷ Gwa c'hwi, dre ma savit beziou kaer d'ar brofeded, pa-z eo ho tadoù o deus o lazhet. ⁴⁸ Evel-se e tougit testeni ec'h asantit da oberoù ho tadoù, peogwir eo int o deus lazhet ar brofeded, ha c'hwi ar re a sav beziou dezho. ⁴⁹ En abeg da se he deus lavaret Furnez Doue : Kas a rin dezho profeded hag ebetel, hag ar re-mañ a lazhint, hag ar re-se a wallgasint, ⁵⁰ evit ma vo goulennet kont digant ar rummad-mañ, eus gwad an holl brofeded bet skuilhet abaoe krouidigezh ar bed, ⁵¹ adal gwad Abel betek hini Zakaria, a zo bet lazhet etre an aoter hag ar santual. Ya, me lavar deoc'h, goulennet e vo ar gont-se digant ar rummad-mañ. ⁵² Gwa c'hwi, Doktored al Lezenn, dre m'hoc'h eus skrapet ganeoc'h alc'hwez ar ouiziegezh. C'hwi hoc'h-unan n'oc'h ket antreet enni, hag ar re a glaske antren, hoc'h eus harzet outo.» ⁵³ Jezuz a yeas er-maez, hogen ac'hano ivez en em lakaas ar Skribed hag ar Farizianed da gaout droug outañ ha da waskañ warnañ gant o goulennou, ⁵⁴ en ur stegnañ pechoù dezhañ da bakañ ur gomz bennak eus e c'henou.»

Goell ar Farizianed.

12 ¹ Ha neuze pa oa en em zastumet tud a vilieroù betek m'en em waskent an eil egile, en em lakaas Jezuz da gomz, ouzh e ziskibien da gentañ : «Diwallit diouzh goell ar Farizianed, da lavarout eo, ar pilpouzerezh. ²N'eus netra goloet na vo ket dizoloet, na n'eus netra kuzhet na vo ket anavezet. ³Gant-se, kement ho po lavaret en deñvalijenn a vo klevet er sklêrijenn; hag ar pezh ho po lavaret e pleg ar skouarn, er c'havioù, a vo embannet war an toennoù.

Disklêriañ dispont e feiz.

⁴ «Me a lavar deoc'h, va mignoned, n'ho pet ket aon rak ar re a laz ar c'horf, ha n'hellont goude-se ober netra ouzhpenn. ⁵ Ez an da ziskouez deoc'h piv a zleit kaout aon razañ : an hini en deus, goude lazhañ, galloud da deurel er gehenna. Ya, ma a lavar deoc'h, hennezh ho pet aon razañ. ⁶ Daoust ha n'eo ket daou wenneg e werzher pemp golvan? Ha koulskoude n'eus ket unan anezho a ve ankounac'haet gant Doue. ⁷ Betek blev ho penn a zo kontet holl. N'ho pet ket aon eta : muioc'h a dalvezit eget ur bern golveni. ⁸ Me a lavar deoc'h : An hini en devo va anzavet dirak an dud, Mab an Den ivez en anzavo dirak Aeled Doue. ⁹ Met an hini en devo va dianzavet dirak an dud, a vo dianzavet dirak Aeled Doue.

Ar pec'hed enep ar Spered Santel.

¹⁰ «Hag an hini a lavaro ur gomz bennak enep Mab an Den, e vo pardonet dezhañ, met an hini a wallgomzo enep ar Spered Santel, ne vo ket pardonet dezhañ.

Skoazell ar Spered Santel en heskinerezh.

¹¹ «Pa vezot kaset dirak ar sinagogennoù, ar pennadurezhioù hag an dud e karg, na vezit ket chalet penaos respont na petra da lavarout. ¹² Rak ar Spered Santel a zesko deoc'h d'an eur-se petra a zleot da respont.

Madou an douar ha buhez an neñv.

¹³ Unan bennak a-douez ar bobl a lavaras dezhañ : «Mestr, lavar d'am breur rannañ an hêrezh ganin.» ¹⁴ Eñ avat a respontas : «Piv en deus va lakaet da varner pe da ranner kenetrezo'h?» ¹⁵ Neuze e lavaras dezho : «Taolit evezh, ha diwallit diouzh pep gwallc'hoantegezh. Rak goude ma ve stank madoù an den, n'emañ ket e vuhez diouzh e beadra.» ¹⁶ Hag e lavaras dezho ur barabolenn : «Un den pinvidik a oa hag en devoa e zouar taolet kalz a frouezh dezhañ. ¹⁷ Hag e soñje ennañ e-unan : Petra a rin, pa n'em eus ket pealec'h da serriñ va eost? ¹⁸ Ma lavaras : Kement-mañ a rin : diskar va solieroù ha sevel reoù vrasoc'h; eno e tastumin va holl ed ha va madoù. ¹⁹ Hag e lavarin d'am ene : Va ene, bez' ec'h eus ur bern madoù sanailhet evit kalz a vloavezhioù. Diskuizh, debr hag ev, ha bez laouen. ²⁰ Hogen Doue a lavaras dezhañ : Den diskiant, en noz-mañ end-eeun, e vo goulennet da ene diganit. Hag ar pezh ac'h eus dastumet, da biv e vo? ²¹ Evel-se emañ an hini a zastum madoù evitañ e-unan e-lec'h pinvidikaat e-keñver Doue.»

Lakaat e fiziañs e Doue. Klask da gentañ Rouantelezh an Neñv.

²² Lavarout a reas ivez d'e ziskibien : «Setu perak e lavaran deoc'h : n'en em chalit ket evit ho puhez, da c'houzout petra vo deoc'h da zebriñ, nag evit ho korf gant petra e vo gwisket. ²³ Rak ar vuhez a zo muioc'h eget ar boued, hag ar c'horf muioc'h eget ar gwiskamant. ²⁴ Sellit ouzh ar brini : ne hadont ket, ne vedont ket, n'o deus na kav na solier; ha koulskoude Doue a ro boued dezho. Na pegement muioc'h eget an evned ne dalvezit ket c'hwi ! ²⁵ Piv ac'hanoc'h a c'hell dre ziaezañ e spered, astenn e vuhez eus un ilinad? ²⁶ Ma n'oc'h ket evit ober ar pezh a zo nebeut, perak bezañ diaes ho spered gant ar peurrest? ²⁷ Taolit evezh ouzh al lili, penaos ne labouront ket, ne nezont ket, ha koulskoude, me a lavar deoc'h, na Salomon e-unan en e holl splannder, ne oa ket gwisket evel

unan anezho. ²⁸ Mard eo gwisket evel-se gant Doue war ar maez, ar geot a zo hiziv anezho, hag a vo warc'hoazh stlapet er forn, na pegement muioc'h ne ray ket evidoc'h, tud amgredik. ²⁹ Na c'hwi kennebeut-all na glaskit ket petra a zebrot na petra a evot, na gemerit ket trubuilh gant se. ³⁰ An holl draoù-se, paganed ar bed a glask anezho. Evidoc'h avat, ho Tad a oar hoc'h eus ezhomm anezho. ³¹ Rak-se klaskit e Rouantelezh, hag an traoù-se a vo roet deoc'h en tu-hont. ³² N'ho pet ket aon, tropell bihan, rak plijet eo bet gant ho Tad reiñ deoc'h ar Rouantelezh. ³³ Gwerzhit ho peadra, ha roit-eñ en aluzon. Aozit evidoc'h yilc'hier na uzont ket, un teñzor diheskus en Neñvouù lec'h na c'hello ket al laer tostaat outañ ha na vo ket dispennet gant an tartouzed. ³⁴ Rak el lec'h m'emañ ho teñzor, eno ivez e vo ho kalon.

Bezañ war evezh.

³⁵ «Ra vo bepred gourizet ho targreiz hag ho lampoù war elum. ³⁶ Ha bezit heñvel ouzh tud o c'hortoz o mestr da zistreiñ eus an eured, ma tigorint dezhañ kerkent ha ma tegouezho ha ma skoio. ³⁷ Eürus ar servijerien-se a vo kavet gant o mestr o veilhañ pa zistroio. E gwirionez, me lavar deoc'h, lakaat a ray e c'houriz en-dro dezhañ hag e ray dezho azezañ ouzh taol, hag o tremen en o zouez en o servije. ³⁸ Ha ma teu d'an eil beilhadenn pe d'an trede, ha m'o c'hav evel-se, eürus ar re-se. ³⁹ Komprenit kement-mañ : mar ouije mestr an ti da bet eur e tlefe dont al laer, e veilhje, ha ne lezje ket toullañ e di. ⁴⁰ C'hwi ivez, bezit prest, rak d'an eur na soñjit ket, e teuo Mab an Den.»

Parabolenn ar merour.

⁴¹ Neuze e lavaras Pêr : «Aotrou, evidomp-ni e lavarez ar barabolenn-se pe evit an holl?» ⁴² Hag e respontas an Aotrou : «Piv eo ar merour feal ha fur a vo lakaet gant e vestr e penn e servijerien da reiñ dezho e koulz o muzuliad gwiniñ? ⁴³ Eürus ar servijer-se a vo kavet gant e vestr, pa zistroio, oc'h ober evel-se. ⁴⁴ E gwirionez, me lavar deoc'h, en lakaat a ray e penn e holl vadoù. ⁴⁵ Met ma lavar ar servijer-se ennañ e-unan : daleañ a ra va mestr da zont ! ha mar krog da skeiñ gant ar vevelien hag ar mitizhien, ha da zebriñ ha da evañ ha d'en em vezviñ, ⁴⁶ e tistroio mestr ar servijer-se d'an deiz n'emañ ket o c'hortoz ha d'an eur na oar ket pehini; en em zisrannañ a ray dioutañ hag e roio dezhañ lod gant an dud difeiz. ⁴⁷ Ar servijer hag a anavez youl e vestr ha n'en devo ket aozet an traoù pe n'en devo ket labouret hervez ar youl-se, hennezh en devo ur gwiskad- bazhadoù. ⁴⁸ Met an hini n'anavez ket ar youl-se hag en devo graet traoù o veritout kastiz, a vo bazhataet un nebeudig. Kement hini a vo roet kalz dezhañ, e vo goulennet kalz digantañ; hag an hini a vo fiziet kalz ennañ, e vo goulennet muioc'h digantañ.

An tan hag ar brezel degaset gant Jezuz.

⁴⁹ «An tan ez on deuet da zegas war an douar, ha nag e karfen e vefe krog a-benn bremañ. ⁵⁰ Ur vadeziant am eus da vezañ badezet enni, ha pegen enkrezet ez on ken na vo kaset da benn. ⁵¹ Krediñ a ra deoc'h ez eo ar peoc'h ez on deuet da zegas war an douar? N'eo ket, me lavar deoc'h, hogen an disrann. ⁵² Rak adalek bremañ en un tiegezh a bemp e vo disrann, tri oc'h enebañ ouzh daou, ha daou ouzh tri. ⁵³ Disrannet e vo an tad enep e vab, hag ar mab enep e dad, ar vamm enep he merc'h, hag ar verc'h enep he mamm, ar vamm-gaer enep he merc'h-kaer, hag ar verc'h-kaer enep he mamm-gaer.»

Arouezioù an amzerioù.

⁵⁴ Lavarout a rae c'hoazh d'an engroez : «Pa welit ur goabrenn o sevel diouzh tu ar c'huzh-heol, e lavarit diouzhtu : Glav a zo o tont, hag e c'hoarvez kement-se. ⁵⁵ Ha pa c'hwezh avel ar c'hreisteiz e lavarit : Ez a da dommañ ! hag e c'hoarvez. ⁵⁶ Pilpouzed, gouzout a rit anaout an amzer diouzh doareoù an neñv hag an douar, hag an amzer-mañ penaos n'hellit ket hec'h anaout?

Diwar-benn ar varn.

⁵⁷ Perak eta ne varnit ket drezoc'h hoc'h-unan petra zo reizh? ⁵⁸ Evel-se, pa c'hoarvez ganit mont gant da enebour da gaout ar penn-rener, klask war an hent an tu da vezañ kuit en e geñver, gant aon n'az sachfe dirak ar barner ha na vefes lakaet gant ar barner etre daouarn ar c'homiser, ha na zeufe ar c'homiser d'az teurel er prizon. ⁵⁹ Me lavar dit : N'i ket er-maez alese ken n'az po daskoret betek ar gwenneg diwezhañ.»

Ober pinijenn. Parabolenn ar fiezenn difrouezh.

13 ¹ Er mare-se e tegouezhas hiniennoù a gemennas da Jezuz ar pezh a oa en em gavet gant an dud-se eus Galilea en devoa Pilat mesket o gwad gant hini o aberzhoù. ² Respont a reas dezho : «Ha soñjal a ra deoc'h e oa ar C'halileidi - se brasoc'h pec'herien eget an holl C'halileidi all, dre m'o deus gouzañvet ur seurt poan? ³ Ne oant ket, me a lavar deoc'h; hogen mar ne rit ket pinijenn, c'hwi holl evel-se a yelo da goll. ⁴ Nag an triwec'h-se hag a gouezhas warno tour Siloan, ouzh o lazhañ, ha soñjal a ra deoc'h e oant kablusoc'h eget an holl dud all o chom e Jeruzalem? ⁵ Ne oant ket, me a lavar deoc'h; hogen mar ne rit pinijenn, c'hwi holl en hevelep doare a yelo da goll.» ⁶ Lavarout a rae c'hoazh dezho ar barabolenn-mañ : «Bez' e oa un den hag en devoa ur fiezenn plantet en e winieg; donet a reas da glask frouezh enni, ha ne gavas ket. ⁷ Neuze e lavaras d'ar gwinienner : Setu tri bloaz zo ma teuan da glask frouezh er fiezenn ha ne gavan ket : troc'hi eta; perak e chomfe da goll douar? ⁸ Aotrou, a respontas hemañ, lez-hi c'hoazh ar bloaz-mañ, ma toullin en-dro dezhi ha ma lakain teil ganti, ⁹ ha marteze e tougo frouezh, en amzer da zont; anez-se, he zroc'hi.»

Un deiz sabad e yac'ha Jezuz ur vaouez daoubleget.

¹⁰ Edo Jezuz o kelenn en ur sinagogenn, un deiz sabad. ¹¹ Hag eno e oa ur vaouez a oa dalc'het triwec'h vloaz a oa gant ur spered he lakae da vezañ nammet : daoubleget e oa ha n'helle tamm ebet sevel he fenn. ¹² Ouzh he gwelout Jezuz he galvas davetañ hag a lavaras dezhi : «Maouez ! disammet out diouzh da zroug.»¹³ Astenn a reas e zaouarn warni, ha war an taol e teuas sonn, hag en em lakaas da veuliñ Doue. ¹⁴ Met an arc'h-sinagogour, droug ennañ, dre m'en devoa Jezuz pareet un deiz sabad, en em lakaas da lavarout d'ar bobl : «C'hwec'h deiz a zo ma tleer labourat enno; deuit eta d'an deizioù-se da vezañ pareet, ha n'eo ket da zeiz ar sabad.» - ¹⁵ «Pilpouzed, a respontas an Aotrou dezhañ, daoust ha pep hini ac'hanoc'h, da zeiz ar sabad, ne zistag ket e ejen pe e azen diouzh o c'hraou evit o c'has d'an dour? ¹⁶ Hag ar verc'h-mañ da Abraham hag a oa ereet gant Satan abaoe triwec'h vloaz, ne oa ket dleet he disammañ diouzh an ere-se, deiz ar sabad?» ¹⁷ Ha pa gomze evel-se, e save mezhañ d'e holl eneberien, met an holl dud a dride a levenez, en abeg d'an traoù burzhudus a rae.

Parabolenn ar c'hreunenn sezo.

¹⁸ Lavarout a rae neuze : «Ouzh petra eo hañval Rouantelezh Doue, ouzh petra he lakain heñvel? ¹⁹ Heñvel eo ouzh ar c'hreunenn sezo en deus kemeret un den ha lakaet en e liorzhañ. Kresket eo ha deuet da vezañ ur wezenn, ha laboused an neñv o deus kavet goudor en he skourroù.»

Parabolenn ar goell.

²⁰ Lavarout a rae c'hoazh : «Ouzh petra e lakain heñvel Rouantelezh Doue? ²¹ Heñvel eo ouzh ar goell a gemer ur vaouez d'e veskañ gant tri muzuliad bleud, ken na zeu an holl doaz da c'hoiñ.»

Jezuz o vont war-zu Jeruzalem; Ar Yuzevien distaolet. Ar Baganed salvet.

²² Tremen a rae dre gêrioù ha bourc'hioù en ur gelenn, oc'h ober hent war-zu Jeruzalem. ²³ Unan bennak a lavaras dezhañ : «Aotrou, daoust hag un nebeud tud a vo salvet?» ²⁴ Eñ avat a lavaras dezho : «Poagnit da vonet e-barzh dre an nor strizh, rak kalz, a lavaran deoc'h, a glasko monet e-barzh, ha n'hellint ket.

²⁵ Pa vo bet savet ar penn-tiegezh evit prenañ an nor, e stagot, c'hwi chomet er-maez da skeiñ en ur lavarout : Aotrou, digor dimp ! hag e responto deoc'h : C'hwi, n'ouzon ket a belec'h ez oc'h. ²⁶ Neuze en em lakaot da lavarout : Debret hag evet hon eus dindan da selloù ha war hor plasennou ec'h eus kelennet ! ²⁷ hag e responto deoc'h : N'ouzon ket a belec'h ez oc'h. Pellait diouzhin, c'hwi holl oberourien an droug !

²⁸ Eno e vo gouelvan ha skrignadeg dent, pa welot Abraham, Izaak ha Yakob, hag an holl brofeded, e Rouantelezh Doue, ha c'hwi taolet er-maez. ²⁹ Hag e teuio tud eus ar C'huzh-heol, hag ar Sav-heol, eus an Hanternoz hag eus ar C'hreisteiz, hag i en em lakaio ouzh taol, e Rouantelezh Doue. ³⁰ Ya, bez' ez eus re ziwezhañ hag a vo e-touez ar re gentañ, ha bez' ez eus re gentañ hag a vo e-touez ar re ziwezhañ.»

Jezuz a heuilh e hent hep aon rak Herodez.

³¹ D'an ampoent-se, e tostaas un nebeud Farizianed hag a lavaras dezhañ : «Kae kuit, kerzh ac'hann, rak Herodez en deus c'hoant d'az lazhañ.» ³² Respont a eure dezho : «It da lavarout d'al louarn-se : Setu ma kasan kuit an drouksperedoù ha ma parean an dud hiziv ha warc'hoazh, ha d'an trede deiz e vo echu ganin. ³³ Hiziv avat, ha warc'hoazh hag an deiz war-lerc'h, e rankan derc'hel da vont war-raok, rak n'eo ket lakaet d'ur profed bezañ lazhet er-maez eus Jeruzalem.

Diwar-benn Jeruzalem : Diskar Jeruzalem.

³⁴ Jeruzalem, Jeruzalem, te hag a lazh ar brofeded hag a labez ar re a gaser dit, na pet gwezh eo bet fellet din tolpañ da vugale evel ma tolpe ur vamm-yar he neizhiad dindan he divaskell, ha n'eo ket bet fellet droc'h. ³⁵ Setu *dija lezet ho ti ganeoc'h*. Ya, me lavar deoc'h : n'am gwelot mui ken na zeuio an deiz ma lavarot : *Benniget an Hini a zeu en anv an Aotrou.*»

Un den dourgoeñvet yac'haet un deiz sabad.

14 ¹ Un deiz ma oa antreet e ti unan eus pennoù ar Farizianed da zebriñ e bred, un deiz sabad, edo ar re-mañ o sellout pizh outañ. ² Setu m'en em gave dirazañ un den klañv gant an dourgoeñv. ³ Hag oc'h en em lakaat da gomz, Jezuz a lavaras d'an dud-a-lezenn ha d'ar Farizianed : «Daoust hag aotre a zo da bareañ da zeiz ar sabad, pe n'eus ket?» ⁴ Int avat a chomas mut. Hag eñ o tapout krog en den-se, en pareas hag en kases kuit. ⁵ Hag e lavaras dezho : «Piv ac'hanoc'h, ma teu

d'e vab pe d'e ejen kouezhañ en ur puñs; n'en tenno ket alese raktal, ha goude ma ve deiz ar sabad?» ⁶Ha ne oant ket evit kaout respont da gement-se.

Kentel war an izelegezh.

⁷D'an dud pedet e lavaras ur barabolenn, rak taolet en devoa evezh penaos e kemerent al lec'hioù kentañ ouzh taol : ⁸«Pa vezez pedet gant unan bennak d'un eured, n'a ket d'en em lakaat er plas kentañ, gant aon na vefe bet kouviet ivez unan enorusoc'h egedout, ⁹ha na zeufe an hini en deus ho pedet ho-taou da lavarout dit : Ro da blas da hemañ ! ha neuze e rankfes gant mezhañ en em lakaat er plas diwezhañ. ¹⁰Hogen pa vezez pedet, kae d'en em lakaat er plas diwezhañ; evel-se, p'en em gavo an hini en deus da bedet, e lavaro dit : Va mignon, kae uheloc'h ! ha neuze e vo un enor evidout dirak an holl gouvidi. ¹¹Rak an neb en em sav a vo izelaet, hag an hini en em izela a vo uhelaet.»

Ober vad d'ar re n'hellont ket reiñ digoll en-dro.

¹²Lavarout a reas ivez d'an hini en devoa e gouviet : «Bep gwezh ma ri merenn pe goan, na bed ket da vignoned, na da vreudeur, na da gerent pe da amezeien binvidik, gant aon n'az pedfent d'o zro ha na vefes paeet evel-se. ¹³Hogen pa ri ur fest bennak, ped kentoc'h peorien, tud vac'hagnet, tud kamm, tud dall. ¹⁴Hag eürus e vi peogwir n'o devo ket peadra da zaskoriñ dit; rak neuze e vo daskoret dit en adsavidigezh an dud reizh.»

Ar goan vras.

¹⁵O klevout kement-se, unan eus ar gouvidi a lavaras dezhañ : «Eürus an neb a zebro bara e Rouantelezh Doue !» ¹⁶Hag eñ a respontas dezhañ : «Un den a oa a reas ur goan vras hag a bedas kalz a dud. ¹⁷Hag e kasas e vevel da goulz ar pred da lavarout d'ar re a oa bet pedet : Deuit, rak prest eo dija pep tra. ¹⁸Int avat en em lakaas holl a-unvan da reiñ digarezioù. An hini kentañ a lavaras dezhañ : Ur vereuri am eus prenet, ha ret eo din mont d'he gwelout. Me az ped d'am digareziñ. ¹⁹Un all a lavaras : Pemp koublad ejened am eus prenet, hag ez an d'o amprouiñ. Me az ped d'am digareziñ. ²⁰Hag un all a lavaras : Emaon o paouez dimeziñ, rak-se n'hellan ket monet. ²¹Ar mevel, o tont en-dro, a gontas kement-se d'e vestr. Neuze ar penn-tiegezh, aet droug ennañ, a lavaras d'e vevel : Kae buan dre blasennoù ha straedoù kêr, ha degas amañ ar re baour, ar re vac'hagnet, ar re dall, ar re gamm. ²²Ar mevel a lavaras : Aotrou, graet eo ar pezh az poa gourc'hemennet, ha plas a zo c'hoazh. ²³Neuze e lavaras an aotrou d'e vevel : Kae dre an hentoù, a-hed ar girzhier, ha dalc'h war an dud da zonet e-barzh, evit ma vo leun va zi. ²⁴Me lavar deoc'h, hini ebet eus ar re a oa bet pedet n'en devo un tañva eus va fest.»

Evit heuliañ Jezuz e tle an den en em nac'h e-unan.

²⁵Engroeziou bras a oa oc'h ober hent gantañ, hag eñ o treiñ etrezek an dud a lavaras dezho : ²⁶«Ma teu unan bennak davedon, ha mar n'en deus ket kasoni ouzh a dad hag ouzh e vamm, ouzh e wreg hag ouzh e vugale, ouzh e vreudeur, ouzh e c'hoarezed, hag ouzh e vuhez zoken, n'hell ket bezañ diskibl din-me. ²⁷An neb na zoug ket e groaz ha na zeu ket war va lerc'h, n'hell ket bezañ diskibl din-me.

²⁸ «Rak piv ac'hanoc'h, ma fell dezhañ sevel un tour, n'azez ket da gentañ d'ober ar gont eus an dispign, da welout ha peadra a-walc'h en deus d'e beurober, ²⁹ gant aon na c'hellfe ket, goude bezañ graet an diazez, kas al labour da benn, ha na zeufe ar re a welje se d'ober goap anezhañ ³⁰ dre lavarout : Sed aze unan en deus klasket sevel un tour ha n'en deus ket gallet e gas da benn !

³¹ Pe c'hoazh, pe roue o vont d'ober brezel ouzh ur roue all, n'azez ket da gentañ d'en em soñjal ha gallout a ray gant dek mil den derc'hel penn ouzh an hini a zeu a-enep dezhañ gant ugent mil? ³² Anez-se, e-keit ha m'emañ pell c'hoazh egile, e kas kannaded da c'houlenn ar peoc'h. ³³ Evel-se kement hini ac'hanoc'h na zilez ket kement en deus, n'hell ket bezañ diskibl din-me.

³⁴ "Un dra vat eo an hollen; met ma teu un hollen da zivlazañ, gant petra e vo advlazel? N'eo mat nag evit an douar nag evit an teil; er-maez e vo taolet. Neb en deus divskouarn da glevout, ra glevo !"

Levenez an neñv evit distro ar bec'herien.

15 ¹ Ar Biblikaned hag ar bec'herien a dostae holl outañ evit e glevout. ² Ma c'hroz mole ar Farizianed hag ar Skribed o lavarout : «Hennezh a zegemer ar bec'herien hag a zebr ganto !»

An dañvad dianket.

³ Neuze e lavaras dezho ar barabolenn-mañ : ⁴ «Piv ac'hanoc'h, dezhañ kant dañvad, ma teu da goll unan anezho, daoust ha ne lez ket an naontek ha pevar-ugent all er gouelec'h, da vont da glask an hini kollet, ken n'en devo en adkavet? ⁵ Ha p'en deus en adkavet, en e laka gant levenez war e zivskoaz, ⁶ ha distroet er gêr, e c'halv e vignoned hag e amezeien, en ur lavarout dezho : "Bezit laouen ganin, rak kavet em eus va dañvad, an hini a oa kollet !" ⁷ Me lavar deoc'h, evel-se e vo levenez en neñvoù evit ur pec'her oc'h ober pinijenn kentoc'h eget evit naontek ha pevar-ugent den reizh ha n'o deus ket ezhomm a binijenn.»

An drakm ezaouet.

⁸ «Pe c'hoazh, pehini ar vaouez hag he deus dek drakm, ma teu da goll unan, daoust ha n'enaou ket ar gouloù ha ne skub ket he zi ha ne glask ket gant evezh betek m'he devo e gavet. ⁹ Ha p'he deus e gavet, e c'halv he mignonezed hag hec'h amezegezed en ur lavarout dezho : "Bezit laouen ganin, rak kavet em eus an drakm am boa kollet !" ¹⁰ Evel-se, me a lavar deoc'h, e vo levenez e-touez Aeled Doue evit ur pec'her oc'h ober pinijenn.»

Ar mab dispigner.

¹¹ Lavarout a reas c'hoazh : «Un den a oa hag en devoa daou vab. ¹² An hini yaouankañ anezho a lavaras d'e dad : Tad, ro din al lod eus an danvez a zle degouezhout din. Hag an tad a rannas e vadoù etrezo. ¹³ Un nebeud deizioù goude, e tastumas ar mab yaouankañ e holl beadra hag ez eas kuit da bell vro; hag eno e foetas e zanvez o ren ur vuhez diroll. ¹⁴ Pa voe dispignet pep tra gantañ, e teuas ur gernez vras war ar vro-se, hag eñ e-unan a grogas da santout dienez. ¹⁵ Mont a reas neuze d'en em c'hoprañ gant unan eus tud ar vro, hag hemañ e gasas d'e barkeier da vesa moc'h. ¹⁶ Karet en divije leuniañ e gof gant ar c'hlos a zebre ar moc'h, met den ne roe dezhañ. ¹⁷ Neuze o tistreiñ outañ e-unan e lavaras : Nag a vevelien e ti va zad o deus bara ouzhpenn

o gwalc'h, ha me amañ o vervel gant an aon. ¹⁸ Sevel a rin hag ez in da gaout va zad hag e lavarinn dezhañ : Tad, pec'het em eus enep an Neñv hag enep dit. ¹⁹ N'on ket dellezek ken da vezañ anvet da vab. Gra din evel da unan eus da vevelien. ²⁰ Hag e savas da vont etrezek e dad. Pell bras c'hoazh e oa p'en gwelas e dad o teredek, ma savas ennañ truez outañ, e lammas en e gerc'henn hag e pokas dezhañ gant karantez. ²¹ Neuze e lavaras e vab dezhañ : Tad, pec'het em eus enep an Neñv hag enep dit, ne veritan ken bezañ anvet da vab. ²² Hogen an tad a lavaras d'e vevelien : Degasit buan ar sae gaerañ hag he gwiskit dezhañ; lakait ur bizoù en e zorn, ha botoù en e dreid. ²³ Degasit al leue lart ha lazhit-eñ; debromp ha greomp fest, ²⁴ rak ar mab-mañ din a oa marv, ha setu-eñ advevet; kollet e oa ha setu-eñ adkavet. Hag en em lakajont d'ober fest. ²⁵ Hogen ar mab henañ a oa er park; en ur zistreiñ evel ma tostae d'an ti, e klevas sonerezh ha dañsoù. ²⁶ Hag eñ o c'hervel unan eus ar servijerien a c'houlennas digantañ petra 'oa kement-se. ²⁷ Hag hemañ a respontas dezhañ : Da vreur eo a zo distro, ha da dad en deus lazhet al leue lart, dre m'en deus en adkavet yac'h. ²⁸ Met droug a yeas ennañ ha n'houlle ket monet en ti. Neuze e teuas e dad er-maez d'en aspediñ. ²⁹ Met eñ a respontas d'e dad : Setu nouspet bloavezh m'az servijan, ha gwezh ebet n'em eus torret da c'hourc'hemennou, met biskoazh n'ec'h eus roet din-me ur c'havrig d'ober fest gant va mignoned. ³⁰ Hogen kerkent ha m'eo deuet en-dro ar mab-se dit-te hag en deus debret da beadra gant merc'hed fall, e lazhez evitañ al leue lart. ³¹ An tad a lavaras dezhañ : Va bugel, te zo dalc'hmat ganin, ha kement am eus-me a zo dit-te. ³² Met ret e oa ober fest hag en em laouenaat, rak da vreur amañ a oa marv, hag advevet eo; kollet e oa hag adkavet eo.»

Ar merour displeal.

16 ¹ Lavarout a reas c'hoazh d'e ziskibien : «Un den pinvidik a oa en devoa ur merour; hag hemañ a voe tamallet dirazañ da vezañ o foranañ e vadoù. ² En gervel a reas da lavarout dezhañ : Petra eo se a glevan diwar da benn? Rent kont eus da vererezh, rak hiviziken n'helli mui bezañ va merour. ³ Ma lavaras ar merour outañ e-unan : Petra 'rin, peogwir e lam va mestr va c'harg a verour diganin? Palat douar? N'em eus ket nerzh a-walc'h. Goulenn an aluzon? Mezhañ am befe. ⁴ Gout a ouzon petra 'm eus d'ober, evit ma vo tud ouzh va degemerout en o ziez, pa vin bet lakaet er-maez eus va c'harg. ⁵ Hag o vezañ galvet, hini hag hini holl dleourien e aotrou, e lavaras d'ar c'hentañ : Pegement a zleez d'am mestr? ⁶ Hemañ da respont : Kant barilhad eoul ! - Kemer da baper, eme ar merour dezhañ, azez buan ha skriv hanter -kant : ⁷ Neuze e lavaras d'un all : Ha te, pegement a zleez? - Kant muzuliad gwinizh, emezañ - Kemer da baper, eme ar merour dezhañ, ha skriv pevar-ugent. ⁸ Hag ar mestr a veulas ar merour displeal-se, dre ma oa en em renet gant poell. Rak poellekoc'h eo bugale ar bed-mañ en o darempredoù gant ar re all eget bugale ar sklêrijenn.

⁹ Me lavar deoc'h, grit mignoned deoc'h gant an arc'hant a zizonestiz, evit ma c'hellot, pa zeuio da vankout, bezañ degemeret ganto en teltennoù peurbadel. ¹⁰ An hini a vez feal en traoù disterañ a vez feal ivez en traoù brasañ; hag an hini dizonest en traoù disterañ a vez dizonest ivez en traoù brasañ. ¹¹ Mar n'oc'h ket bet feal gant an arc'hant a zizonestiz, piv a fizio ennoc'h ar gwir binvidigezh? ¹² Ha mar n'oc'h ket bet feal gant madoù na oant ket deoc'h, piv a roio deoc'h ar pezh a zo deoc'h-c'hwi?

¹³ Servijer ebet ne c'hell servijañ daou vestr : pe en devo kasoni ouzh unan ha karantez ouzh egile, pe ec'h en em stago ouzh unan hag e tisprizo egile. N'hellit ket servijañ Doue hag an Arc'hant.»

A-enep ar Farizianed : Reizhder Doue hag hini an dud.

¹⁴ Ar Farizianed hag a zo stag ouzh an arc'hant, a selaoue an holl draoù-se hag a rae goap anezhañ. ¹⁵ Lavarout a reas dezho : «C'hwi a glask tremen evit tud reizh dirak ar re all, met Doue a anavez ho kalonoù : hag ar pezh a zo uhel evit an dud, a zo tra heugus da sell Doue. ¹⁶ Al Lezenn hag ar Brofeded a zo padet betek Yann; abaoe avat, ez eo keloù mat Rouantelezh Doue ha da bep hini ez eo strivañ da vont e-barzh dre nerzh. ¹⁷ Aesoc'h ez eo d'an neñv ha d'an douar tremen eget d'ul lizherennig eus al Lezenn kouezhañ. ¹⁸ An neb a gas e wreg kuit hag a zimez d'un all, a ra avoultriezh, hag an neb a zimez d'ur wreg kaset kuit gant he gwaz, a ra avoultriezh.»

Parabolenn an den pinvidik hag ar paour Lazar.

¹⁹ «Un den pinvidik a oa anezhañ a veze gwisket gant mezher mouk ha lin moan hag a rene bemdez gouel ha c'hoari kaer. ²⁰ Hag ur paour a oa, Lazar e anv, a veze gourvezet ouzh toull e borched, goloet-holl a c'houlïoù. ²¹ Karet en divije terriñ e naon gant ar pezh a gouezhe diwar daol an den pinvidik. Hag ar chas zoken a zeue da lipat dezhañ e c'houlïoù. ²² Hag e c'hoarvezas d'ar paour mervel ha bezañ douget gant an Aeled en askre Abraham. Ar pinvidik a varvas ivez hag a voe lakaet er bez. ²³ Hag o vezañ e bro ar marv, e savas e zaoulagad eus a-greiz e boanioù hag e welas Abraham a-ziabell ha Lazar en e askre. ²⁴ Hag eñ da grial : Tad Abraham, az pezh truez ouzhin ha kas Lazar ma soubo penn e viz en dour da zistanañ din va zeod, rak poanioù a ziwaskan en tan-flamm-mañ ! - ²⁵ Va bugel, a respontas Abraham, az pezh soñj ec'h eus bet da eurvad e-pad da vuhez, Lazar avat ar gwalleur, met bremañ ez eo frealzet amañ ha te a zo o c'houzañv poan. ²⁶ Hag ouzhpenn-se, etrezoc'h-c'hwi ha ni ez eus bet startaet un islonk bras, en doare ma ne c'hell ket ar re a garfe, tremen ac'halenn betek ennoc'h, na kennebeut all treuziñ alese betek ennomp.»

²⁷ «Neuze, Tad, eme ar pinvidig, da bediñ a ran d'e gas da di va zad, ²⁸ rak pemp breur am eus, ma tougo testeni dezho evit ma ne zeuint ket, int ivez, d'al lec'h-mañ a boanioù. ²⁹ Met Abraham a respontas : Bez' o deus Moizez hag ar Brofeded : dezho d'o selaou ! - ³⁰ Nann, Tad Abraham, eme ar pinvidig, met ma vije unan bennak a-douez ar re varv a yafe d'o c'haout, e rafent pinijenn. ³¹ Abraham avat a respontas dezhañ : Pa ne selaouont na Moizez nag ar Brofeded, ha goude ma savfe unan bennak a-douez ar re varv, ne vefent ket lakaet da grediñ.»

An droukskouer d'ar vugale.

¹⁷ ¹ «Ne c'hell ket bezañ na vefe ket droukskouerioù, met mallozh d'an hini ma teuont drezañ. ² Gwell e vefe dezhañ, mar befe staget ur maen-milin ouzh e c'houzoug, ha ma vefe stlapet er mor, kent eget droukskoueriañ unan hepken eus ar re vihan-mañ. ³ Diwallit ouzhoc'h hoc'h-unan.

An em-reizhañ etre breudeur.

«Ma ra da vreur ur pec'hed, kruz dezhañ, ha ma sav keuz dezhañ, pardon dezhañ. ⁴ Ha ma pec'h seizh gwezh bemdez a-enep dit, ha ma tistro seizh gwezh ouzhit en ur lavarout : Keuz am eus ! e pardoni dezhañ.»

Nerzh ar feiz.

⁵ An Ebestel a lavaras d'an Aotrou : «Kresk ennomp ar feiz.» ⁶ An Aotrou a respontas : «Mar ho pije feiz kement hag ur c'hreunenn-sezo, e lavarfec'h d'ar wezenn-vouar-mañ : En em ziwrizienn ha kae d'en em blantañ er mor; hag e sentfe ouzhoc'h.»

Servijañ gant izelder a galon.

⁷ «Piv ac'hanoc'h, mar en deus ur servijer oc'h arat, pe o vesa, a lavaro dezhañ pa zistroio eus ar park : Deus buan da azezañ ouzh taol? ⁸Daoust ha ne lavaro ket kentoc'h dezhañ : Aoz din peadra da goaniañ, ha stard da c'houriz d'am servijañ, ken n'em bo debret hag evet, ha neuze e c'helli debriñ hag evañ te ivez. ⁹Daoust hag anaoudegezh vat en devo e-keñver ar servijer-se dre m'en devo graet ar pezh a oa gourc'hemennet dezhañ? ¹⁰Evel-se, c'hwi ivez, pa ho po graet kement a zo bet gourc'hemennet deoc'h, lavarit : servijerien dister ez omp : nemet ar pezh a zleemp da ober, n'hon eus graet ken.»

An dek den lovr.

¹¹ Hag oc'h ober hent war-zu Jeruzalem, e c'hoarvezas dezhañ tremen war harzoù Bro-Samaria ha Bro-C'halilea. ¹² Antren a rae en ur vourc'h bennak pa zeuas dek den lovr a-benn-hent dezhañ; o chom a-sav a-ziabell, ¹³e savjont o mouezh da lavarout : «Jezuz, Mestr, az pezh truez ouzhimp.» ¹⁴Ouzh o gwelout e lavaras dezho : «It d'en em ziskouez d'ar veleien.» Ha tra ma oant o vont, e tegouezhas ganto bezañ glanaet. ¹⁵Unan anezho oc'h en em welout yac'haet, a zeuas war e giz en ur ganañ klod Doue a vouezh uhel; ¹⁶hag ec'h en em daolas war e c'henoù ouzh treid Jezuz ouzh en trugarekaat. Ur Samariad e oa anezhañ. ¹⁷Ha Jezuz da gomz ha da lavarout : «Daoust hag o dek n'int ket bet glanaet? An nav all, pelec'h emaint? ¹⁸N'eus en em gavet eta evit distreiñ da zougen klod da Zoue, nemet an estren-mañ !» ¹⁹Hag e lavaras dezhañ : «Sav da vont; da feiz he deus da salvet.»

Donedigezh Rouantelezh Doue. Donedigezh Mab an Den.

²⁰ Evel ma oa bet goulennet outañ gant ar Farizianed pegoulz e teuje Rouantelezh Doue, e respontas dezho : «Ne zeu ket Rouantelezh Doue en ur sachañ an evezh. ²¹Ne vezo ket lavaret : Amañ emañ ! pe aze emañ ! rak sed emañ Rouantelezh Doue en ho touez.» ²²Lavarout a reas c'hoazh d'e ziskibien : «Donet a ray un amzer ma c'hoantaot adwelout unan eus deizioù Mab an Den, ha ne welot ket. ²³Lavaret e vo deoc'h : Aze emañ ! Amañ emañ ! Nad it ket, na redit ket da welout. ²⁴Rak evel al luc'hedenn o tarzhañ eus ur penn d'an oabl hag o lugerniñ betek ar penn all, evel-se e vo Mab an Den, en e zeiz. ²⁵Met da gentañ eo ret dezhañ gouzañv kalz, ha bezañ distaolet gant ar rummad-mañ. ²⁶Evel ma tegouezhas en amzer Noe, evel-se e vo ivez en amzer Mab an Den : ²⁷an dud a zebre, a eve, a zimeze, paotred ha merc'hed, betek ma'z eas Noe en arc'h ha ma teuas an dour-beuz o distrujas holl. ²⁸Evel ma tegouezhas ivez en deizioù Lot : an dud a zebre, a eve, a brene, a werzhe, a blante, a save tiez. ²⁹Met d'an deiz ma'z eas Lot kuit eus Sodom, e lakaas Doue da gouezhañ eus an neñv ur glav tan ha souffr o distrujas holl. ³⁰Evel-se e vo d'an deiz m'en em ziskulio Mab an Den. ³¹En deiz-se, an hini a vezo war e leurdoenn hag en devo e zilhad en ti, ra chomo hep diskenn d'o c'herc'hat; hag an hini a vezo er park, ra chomo ivez hep distreiñ war e giz. ³²Ho pet soñj eus gwreg Lot. ³³An neb a glasko mirout e vuhez he c'hollo, hag an

neb he c'hollo he miro bev-buhezek. ³⁴ Me lavar deoc'h, en noz-se, eus an daou a vo en un hevelep gwele, e vo kemeret an eil ha lezet egile; ³⁵ eus an div a vo o valañ a-gevret e vo kemeret an eil ha lezet eben.» ⁽³⁶⁾

³⁷ Hag int da c'houlenn : «Aotrou, pelec'h e vo?» Respont a reas dezho : «El lec'h ma vezo ar c'horf, eno ivez en em zastumo ar bultured.»

Ar barner displeal hag an intañvez.

18 ¹ Lavarout a reas c'hoazh ur barabolenn dezho diwar-benn ar ret ma'z eo pediñ dalc'hmat hep laoskaat : ² «En ur gêr bennak, emezañ, e oa ur barner ha na zouje ket Doue, ha n'en devoa douj ebet evit an den. ³ Hag er gêr-se ivez e oa un intañvez a zeue d'e gaout en ur lavarout dezhañ : Ro va gwir din enep va enebour. ⁴ Hag e-pad pell, ne fellas ket dezhañ. Met a-benn an dibenn, e lavaras ennañ e-unan : Ha goude na zoujan ket Doue ha n'em eus douj ebet evit den, ⁵ koulskoude, dre ma'z eo un torr-penn an intañvez-se, e roin he gwir dezhi, gant aon na zalc'hfe da zont hep fin ebet d'ober trouz din.» ⁶ Hag an Aotrou a lavaras : «Klevit ar pezh a lavar ar barner displeal-se. ⁷ Ha Doue ne roje ket o gwir d'e dud dibabet pa c'harmont etrezek ennañ, noz-deiz, hag a chomfe o taleañ en o c'heñver? ⁸ Me a lavar deoc'h, e roio prim o gwir dezho. Hogen pa zeuy Mab an Den, daoust hag e kavo feiz war an douar?»

Ar Farizian hag ar Publikan.

⁹ Lavarout a reas c'hoazh ar barabolenn-mañ evit ar re a gave dezho e oant reizh, hag a zisprize ar peurrest eus an dud : ¹⁰ «Daou zen a bignas d'an Templ da bediñ : unan anezho a oa Farizian hag egile Publikan. ¹¹ Ar Farizian sonn en e sav, a bede evel-henn ennañ e-unan : Doue, da drugarekaat a ran dre ma n'on ket evel ar peurrest eus an dud, a zo laeron, tud displeal, avoultrerien, nag evel ar Publikan-mañ. ¹² Yunañ a ran div wezh ar sizhun, hag e roan an deog eus kement a c'hounez. ¹³ Ar Publikan avat oc'h en em zerc'hel pell-bras ne grede ket zoken sevel e zaoulagad etrezek an Neñv, nemet skeiñ a rae war boull e galon en ur lavarout : Doue, az pezh truez ouzhin-me, pec'her ma'z on ! ¹⁴ Me lavar deoc'h, hemañ a ziskennas d'e di reizh dirak Doue ha n'eo ket egile, rak an neb en em uhela a vezo izelaet, hag an neb en em izela a vezo uhelaet.»

Jezuz o vennigañ ar vugaligoù.

¹⁵ Degas a rae an dud bugaligoù dezhañ evit ma stokje outo. o welout kement-se, an diskibien a groze dezho. ¹⁶ Met Jezuz o galvas hag a lavaras : «Lezit ar vugaligoù da zont davedon, ha na virit ket outo. Rak d'ar re a zo heñvel outo, ez eo Rouantelezh Doue.

¹⁷ E gwirionez, me lavar deoc'h : An neb na zegemer ket Rouantelezh Doue evel ur bugel, nann, ned aio ket e-barzh.»

Riskl ar binvidigezh.

¹⁸ Neuze unan bennak eus ar pennadurezhioù a c'houlennas digantañ : «Mestr mat, petra am eus d'ober evit kaout ar vuhez peurbadel da hêrezh?» ¹⁹ Hag e lavaras Jezuz dezhañ : «Perak e rez mat ac'hanon? N'eus hini ebet a ve mat nemet Doue hepken. ²⁰ Ar gourc'hemennoù a anavezez :

*Na ri ket avoultriezh, na lazhi ket,
na laeri ket, na lavari ket falstesteni;
da dad, da vamm a enori.»*

²¹ Hemañ a respontas : «Kement-se holl am eus miret abaoe va yaouankiz.» ²² O klevout se, e lavaras Jezuz dezhañ : «Un dra c'hoazh a vank dit : gwerzh kement a zo dit, hag en ro d'ar beorien, hag az po un teñzor en Neñvoù. Ha da c'houde, deus d'am heul.» ²³ O klevout ar c'homzoù-se, e teuas gwall-drist, rak pinvidik-mor e oa. ²⁴ Ouzh e welout, e lavaras Jezuz : «Pegen diaes ez eo d'ar re o deus danvez, mont e-barzh Rouantelezh Doue. ²⁵ Aesoc'h eo d'ur c'hañval tremen dre doull un nadoz eget d'un den pinvidik mont e-barzh Rouantelezh Doue.» ²⁶ Ma lavaras ar re a selaoue : «Piv neuze a c'hell bezañ salvet?» Eñ a respontas; «Ar pezh na c'hell ket an dud, Doue a c'hell.» ²⁸ Pêr a lavaras neuze : «Setu m'hon eus ni dilezet ar pezh oa dimp evit mont war da lerc'h.» ²⁹ Respont a reas dezho : «E gwirionez, me lavar deoc'h, n'eus den a gement a zilez e di, e wreg, e vreudeur, e gerent pe e vugale, abalamour da Rouantelezh Doue, ³⁰ ha na resevo ket kalz muioc'h adal an amzer-mañ, hag en amzer da zont ar vuhez peurbadel.»

Evit an trede gwezh e tiougan Jezuz e Basion.

³¹ O kemerout gantañ an Daouzek, e lavaras dezho : «Setu ma pignomp da Jeruzalem, hag e vo kaset da benn kement a zo bet skrivet gant ar Brofeded diwar-benn Mab an Den. ³² Lakaet e vo etre daouarn ar baganed, goapaet e vo, dismegañset e vo, skopet e vo outañ, ³³ ha goude bezañ e skourjezet, en lakaint d'ar marv. Ha d'an trede deiz ec'h adsavo da vev.» ³⁴ Int avat ne gomprenjont mann ebet e kement-se, rak komzoù kuzhet e oant evito, ha ne welent ket petra a dalvezent da lavarout.

Den dall Yeriko.

³⁵ Evel ma tostae ouzh Yeriko, e oa un den dall azezet war ribl an hent o c'houlenn an aluzon. ³⁶ O klevout tud o tremen, e c'houlennas petra a oa kement-se. ³⁷ Respontet e voe dezhañ edo Jezuz an Nazaredad o tremen. ³⁸ Neuze e krias : «Jezuz, Mab David, az pez truez ouzhin.» ³⁹ Ar re a gerzhe er penn-araok en c'hourdrouze evit ma tavje. Eñ avat a youc'he kreñvoc'h a se : «Mab David, az pez truez ouzhin.» ⁴⁰ Jezuz a chomas a-sav hag a c'hourc'hemennas en degas dezhañ. Pa voe erru tost, e c'houlennas digantañ : ⁴¹ «Petra ec'h eus c'hoant a rafen dit?» - «Aotrou, emezañ, ma welin !» ⁴² Ha Jezuz a lavaras dezhañ : «Gwel, da feiz he deus da salvet.» ⁴³ War an taol, e welas hag ez eas war e lerc'h en ur ganañ klod Doue. Hag o welout kement-se, ar bobl a-bezh a zougas meuleudi da Zoue.

E ti an tailhanter Zake.

¹⁹ ¹ Ur wezh antreet e treuze Yeriko. ² Ha setu un den anvet Zake, eñ a oa ur penn-bras eus an dailhanterien, un den pinvidik, ³ a glaske gwelout Jezuz da c'houzout piv e oa, met n'helle ket abalamour d'ar bobl, dre ma oa bihan e vent. ⁴ Neuze e redas a-raok, hag e pignas en ur sikamorenn, evit e welout, rak dre eno e tlee tremen. ⁵ P'en em gavas Jezuz el lec'h-se, e savas e zaoulagad hag e lavaras dezhañ : «Zake, diskenn buan, rak ez ti eo ret din lojañ hiziv.» ⁶ Buan e tiskennas neuze hag en degemer a reas gant levenez. ⁷ O welout kement-se, e c'hrozmoles an holl en ur lavarout : «Da di ur pec'her ez eo aet da lojañ.» ⁸ Met Zake, start a galon, a lavaras d'an Aotrou :

«Sell, Aotrou : an hanter eus va madoù a roan d'ar beorien, ha mar em eus graet gaou ouzh unan bennak, e taskorin dezhañ peder gwezh kemend-all.» ⁹ Jezuz neuze a lavaras dezhañ : «Hiziv eo deuet ar silvidigezh en ti-mañ, rak hemañ ivez a zo ur mab da Abraham. ¹⁰ Deuet eo Mab an Den da glask ha da salviñ ar pezh a oa kollet.»

Parabolenn ar minennoù.

¹¹ Evel m'edont o selaou an traoù-se, e lavaras c'hoazh ur barabolenn, dre m'edo tost da Jeruzalem, ha ma kave dezho edo Rouantelezh Doue o vont d'en em ziskouez diouzhtu. ¹² Lavarout a reas eta : «Un den a renk uhel a yeas d'ur vro bell, evit resev evitañ ar galloud a roue ha donet en-dro goude-se. ¹³ O vezañ galvet dek eus e servijerien, e roas dezho dek minenn hag e lavaras dezho : Lakait-i da dalvezout betek ma vin distro. ¹⁴ E genvroidi o devoa kasoni outañ hag e kasjont kannaded war e lerc'h da lavarout : Ne vennomp ket e vefe hennezh roue warnomp. ¹⁵ Ur wezh distro, goude bezañ resevet ar galloud a roue, e reas gervel davetañ ar servijerien en devoa roet arc'hant dezho, da c'houzout pegement en devoa gounezet pep hini. ¹⁶ An hini kentañ a zeuas hag a lavaras : Aotrou, da vinenn he deus gounezet dek. - ¹⁷ Mat eo ! servijer mat, emezañ, dre ma'z out bet feal en traoù dister, az po galloud war dek kêr. ¹⁸ Neuze e teuas an eil o lavarout : Da vinenn, Aotrou, he deus gounezet pemp. ¹⁹ Da hemañ c'hoazh e respontas : Ha te ivez, ren war bemp kêr. ²⁰ Un trede a zeuas o lavarout : Aotrou, setu da vinenn am eus miret paket en ul lienenn. ²¹ Aon am boa razout, dre ma'z out un den garv, o kemerout an arc'hant n'ac'h eus ket postet, hag o vediñ ar pezh n'ac'h eus ket hadet. ²² Respont a reas dezhañ : Diouzh komzoù da c'henoù az parnan, servijer fall. Gout a ouies ez on-me un den garv o kemerout an arc'hant n'am eus ket postet, hag o vediñ ar pezh n'am eus ket hadet. ²³ Perak eta n'ec'h eus ket lakaet va arc'hant en ti-bank? Ha pa vijen deuet en-dro, em bije e dennet gant ar mad diwarnañ. ²⁴ Ha d'ar re a oa en-dro dezhañ, e lavaras : Lamit digantañ ar vinenn ha roit-hi d'an hini en deus dek. - ²⁵ Aotrou, emezo, dek minenn en deus dija !- ²⁶ Me lavar deoc'h, d'an neb en deus e vo roet; met digant an hini n'en deus ket e vo lamet zoken ar pezh en deus. ²⁷ Evit va enebourien avat, ar re-se ha na vennent ket e vijen roue warno, o degasit amañ hag o lazhit dirazon.»

Jezuz oc'h antren e Jeruzalem, evel ur roue.

²⁸ Ha goude bezañ lavaret se, e kerzhas Jezuz en o raok, evit sevel da Jeruzalem.

²⁹ Ha pa voe tost da Betfage ha da Vetania, e-kichen ar menez anvet Menez an Olived, e kasas daou eus e ziskibien, ³⁰ en ur lavarout dezho : «It d'ar gêriadenn amañ a-dal deoc'h, hag o vont enni, e kavot staget un azenig ha n'eus pignet c'hoazh den ebet warnañ. Distagit-eñ hag en degasit din. ³¹ Ha ma c'houlenn unan bennak ouzhoc'h perak en distagit, respontit evel-henn : An Aotrou en deus ezhomm anezhañ.» ³² O vont eta, ar gannaded a gavas an traoù evel m'en devoa lavaret dezho. ³³ Ha p'edont o tistagañ an azenig, e c'houlennas e vistri diganto : «Petra zo ma tistagit an azenig-se?» ³⁴ Hag i da respont : «An Aotrou en deus ezhomm anezhañ.» ³⁵ En degas a rejont da Jezuz, hag o vezañ taolet o mantilli war gein an azenig, e lakajont Jezuz da sevel warnañ. ³⁶ Tra ma'z ae war-raok, e lede an dud o mantilli war an hent. ³⁷ Hag erru e oa dija tost da ziribin Menez an Olived, pa stagas holl engroez an diskibien trec'het gant al levenez, da veuliñ Doue a vouezh kreñv, evit an holl vurzudoù o devoa gwelet. ³⁸ Hag e lavarent :

«Ra vo benniget an hini a zeu,
eñ ar Roue, en anv an Aotrou.
Peoc'h en Neñv ha klod en uhelderioù.»

³⁹ Hiniennoù eus ar Farizianed oc'h en em gaout e-touez ar bobl, a lavaras dezhañ : «Mestr, gra trouz d'az tiskibien.» ⁴⁰ Met eñ a respontas : «Me lavar deoc'h, ma tav ar re-mañ eo ar vein a youc'ho !»

Jezuz o ouelañ war Jeruzalem.

⁴¹ Evel ma tostae, pa welas Kêr, e ouelas warni en ur lavarout : ⁴² «Ma komprenjes en deiz-mañ, te ivez, ar pezh a rofe dit ar peoc'h. Bremañ siwazh ! emañ kuzhet ouzh da zaoulagad. ⁴³Ya, donet a ray warnout un amzer, ma kleuzo da enebourien foziou en-dro dit, evit lakaat seziz warnout ha da waskañ a bep tu. ⁴⁴Da flastrañ a raint ouzh an douar, te ha da vibien ennout-te, ha ne lezint ket ac'hanout-te maen war vaen, dre n'ec'h eus ket anavezet an amzer ma'z out bet gweladennet.»

Jezuz oc'h argas ar varc'hadourien eus an Templ.

⁴⁵ Aet e-barzh an Templ en em lakaas da argas er-maez ar werzourien, ⁴⁶ en ur lavarout dezho : «Skrivet eo : Va Zi a vo un ti a bedenn, c'hwi avat a ra gantañ un toull-laeron.» ⁴⁷Ha bemdez e veze o kelenn en Templ. An Arc'h-veleien hag ar Skribed a glaske e gas da goll, hag ivez pennoù bras ar bobl. ⁴⁸ Nemet ne ouient ket penaos en em gemerout, rak an holl bobl a veze e-pign outañ, ouzh e selaou.

Ur goulenn ouzh Jezuz diwar-benn ar vestroniezh.

20 ¹ Unan eus an deizioù-se m'edo o kelenn ar bobl en Templ, hag o kemenn ar C'heloù mat, e tegouezhas ar Veleien-Vras hag ar Skribed gant an Henaourien. ² Hag e lavarjont dezhañ ar c'homzoù-mañ : «Lavar dimp dre beseurt galloud e rez kement-se, pe biv en deus roet dit ar galloud-se?» ³ Hag e respontas dezho : «Ur goulenn a rin ouzhoc'h, me ivez. Lavarit din eta : Badeziant Yann, daoust hag eus an Neñv e oa pe eus an dud?» ⁵ Int a brederie enno o-unan : «Ma respontomp : eus an Neñv, e lavaro : Perak n'hoc'h eus ket kredet ennañ? ⁶Ha mar lavaromp : eus an dud, e vimp meinet gant an holl bobl, rak krediñ a reont start e oa Yann ur Profed.» ⁷ Respont a rejont eta ne ouient ket eus pelec'h e teue. ⁸ Ha Jezuz da lavarout dezho : «Na me kennebeut, ne lavarint ket deoc'h dre beseurt galloud e ran-me kement-se.»

Parabolenn ar winierien vuntreien.

⁹ Hag e stagas da lavarout dirak ar bobl ar barabolenn-mañ : «Un den a oa, a blantas ur winieg; he feurmiñ a eure da winierien hag ez eas evit pell amzer d'an estrenvro. ¹⁰D'ar c'houlz merket, e kasas ur mevel da gaout ar winierien, ma rojent dezhañ eus frouezh ar winieg. Ar re-mañ avat en kasas kuit hep netra, goude bezañ skoet gantañ. ¹¹ Adarre e kasas dezho ur servijer all. Hag hemañ ivez a voe skoet, dismegañset ha kaset en-dro hep netra. ¹² Adarre e kasas un trede; hag eñ ivez a voe gloazet ha taolet er-maez. ¹³ Neuze e lavaras perc'henn ar winieg :

Petra a rin? Kas a rin dezho va mab muiañ-karet, marteze o devo doujañs outañ. ¹⁴Met p'en weljont e tivizas ar winierien kenetrezo : Setu amañ ar pennhêr, lazhomp-eñ, ma

tegouezho ganimp an hêrezh. ¹⁵ En stlepel a rejont er-maez eus ar winieg hag en lazhañ. Petra eta a ray dezho mestr ar winieg? ¹⁶ Donet a ray, lakaat ar winierien-se d'ar marv ha reiñ ar winieg da dud all.» O klevout se e lavarjont : «Doue ra viro.» ¹⁷ Eñ avat, gant e sell o parañ warno a lavaras : «Petra a dalv eta ar gerioù-mañ eus ar Skritur :

*Ar maen bet distalet gant saverien an ti,
hennezh a zo deuet da vezañ
ar maen-korn uhelañ?*

¹⁸ An neb a gouezho war ar maen-se a vo brevet outañ hag an neb a gouezho ar maen-se warnañ a vo flastret.» ¹⁹ Neuze d'an eur-se e klaskas ar Skribed hag an Arc'h-veleien lakaat o daouarn warnañ; nemet aon o devoa rak ar bobl. Rak komprenet o devoa e oa a-enep dezho en devoa lavaret ar barabolenn-se.

Truaj dleet da Gaesar.

²⁰ Neuze e krogjont da deurel evezh-mat outañ hag e kasjont d'e gaout spierien hag a rafe van da vezañ tud reizh, evit e dapout en ur gomz bennak ha gallout e lakaat etre daouarn ha dindan c'halloud ar gouarnour. ²¹ Goulenn a rejont eta outañ : «Mestr, gout a ouzomp e komzez hag e kelennez gant lealded, ha ne sellez ket ouzh diavaez an dud, met kelenn a rez hent Doue, hervez ar wirionez. ²² Daoust hag aotreet eo dimp paeañ an truaj da Gaesar, pe ned eo ket?» ²³ Eñ avat, o kompren mat o gwidre a respontas dezho : ²⁴ «Diskouezit din un diner. Eus piv eo ar skeudenn hag an enskrivadur a zo warnañ?» - «Eus Kaesar», emezo. ²⁵ Neuze e lavaras Jezuz dezho : «Daskorit eta da Gaesar ar pezh a zo da Gaesar, ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue.» ²⁶ Ha ne c'helljont ket e dapout en e gomzoù dirak ar bobl; ha souezhet-bras gant e respont, e tavjont.

Sadukeidi ha dasorc'h ar c'horfoù.

²⁷ Tostaat a reas hiniennoù eus ar Sadukeidi, ar re-se a lavar n'eus ket a zasorc'hidigezh. Goulenn a rejont digantañ : ²⁸ «Mestr, Moizez en deus gourc'hemennet dimp : ma c'hoarvez da vreur unan bennak bezañ dimezet ha mervel divugel, e tle e vreur dimeziñ gant an intañvez, da sevel ligned d'e vreur. ²⁹ Bez' e oa eta seizh breur; an hini kentañ a zimezas hag a varvas dishêr. ³⁰ Neuze an eil, ³¹ hag an trede a gemeras an intañvez, hag evel-se o seizh e varvjont hep lezel bugale. ³² En diwezh, e varvas ar wreg ivez. ³³ Ar wreg-se eta, d'an dasorc'hidigezh, da behini anezho e vo gwreg? Rak d'eo seizh eo bet evel pried.» ³⁴ Ha Jezuz a respontas dezho : «Bugale ar bed-mañ a gemer gwaz pe wreg. ³⁵ Ar re a vo bet kavet dellezek eus ar bed all, hag eus an dasorc'h a-douez ar re varv, ne gemerint na gwaz na gwreg. ³⁶ Rak n'hellont ken mervel, par ez int d'an Aeled ha mibien da Zoue, dre ma'z int mibien an dasorc'hidigezh. ³⁷ Ec'h adsavfe ar re varv da vev, Moizez ivez en e gomzoù diwar-benn ar Bod, en deus en roet da gompren, pa ra eus an Aotrou : *Doue Abraham, Izaak ha Jakob*. ³⁸ Doue n'eo ket un Doue tud varv, hogen un Doue tud vev. Rak an holl evitañ a zo bev.» ³⁹ Hiniennoù eus ar Skribed a respontas dezhañ :

«Mestr, komzet mat ec'h eus.» ⁴⁰ Ha ne gredent ken ober outañ goulennoù.

Ar Mesiaz a zo mab da Zavid hag e Aotrou.

⁴¹ Lavarout a reas c'hoazh Jezuz dezho : «Penaos e c'heller lavarout ez eo ar C'hrist mab da Zavid? ⁴² Rak David e-unan a lavar e levr ar Salmoù :

*Lavaret en deus an Aotrou d'am Aotrou :
Azez en tu dehoù din,
43 betek ma 'm bo lakaet da enebourien
da skabell dindan da dreid.*

44 David eta a ra Aotrou anezhañ. Penaos neuze e c'hell bezañ e vab?»

Jezuz o tamall d'ar Skribed o falsentez.

45 Evel m'edo an holl bobl ouzh e selaou, e lavaras d'an diskibien : 46 «Diwallit diouzh ar Skribed a fell dezho bale gant saeoù hir, a gar ar saludoù war ar plasenoù, ar c'hadorioù kentañ er sinagogennoù hag ar plasoù a enor er banvezioù, 47 int hag a zebr tiegezhioù an intañvezed, evito d'ober van da bediñ kalz. Rustoc'h a se e vint kondaonet.»

Prof an intañvez paour.

21 1 Ovezañ savet e zaoulagad, e welas tud pinvidik o lakaat o frofoù en teñzor. 2 Gwelout a reas ivez un intañvez ezhommek a lakae daou bezig-moneiz; 3 hag e lavaras : «E gwirionez, me lavar deoc'h, an intañvez paour-mañ he deus lakaet muioc'h egeto holl. 4 Rak ar re-se holl o deus roet e prof diwar o dreist-ezhomm; hi avat o kemer diwar he dienez, he deus profet kement he devoa evit bevañ.»

Diskar Jeruzalem hag an eil donedigezh.

5 Evel ma lavare hiniennoù diwar-benn an Templ, e oa kinklet gant mein kaer ha donezonoù-gouestl, e lavaras : 6 «Évit an traoù-se a sellit outo e teuio deizioù ma ne chomo ken anezho maen war vaen a gement na vo ket diskaret.» 7 Goulenn a rejont outañ : «Mestr, pegoulz eta e vo kement-se, ha petra vo an arouez ma vo an traoù-se war-nes c'hoarvezout?» 8 Eñ a respontas : «Diwallit da ziheñchañ. Rak kalz a zeuio dindan va anv hag a lavaro : Me eo ! ha : Tost eo ar c'houlz ! N'it ket d'o heul. 9 Ha pa glevot komz eus brezelioù ha taolioù-dispac'h, na vezit ket spontet; ret eo e c'hoarvezfe kement-se da gentañ, hogen n'eo ket diouzhtu e vo an diwezh.»

10 Neuze e lavaras dezho : «Sevel a ray broad enep broad ha rouantelezh enep rouantelezh. 11 Krenioù-douar bras a vo, hag amañ hag a-hont bosenoù, naonegezhioù; darvoudoù spontus a vo hag en neñv arouezioù bras. 12 Met a-raok kement-se e taolint o daouarn warnoc'h, ho stlejañ d'ar sinagogennoù ha d'ar prizonioù, ho kas dirak ar rouaned hag ar c'houarnourien abalamour d'am anv. 13 Gant-se ho po tro da reiñ testeni din. 14 Lakait mat en ho soñj n'ho po ket da brederiañ en a-raok petra vo da respont. 15 Rak me eo a roio deoc'h komz ha furnez, a seurt ma n'hell ket hoc'h enebourien herzel outo nag o dislavarout. 16 Gwerzhed e vezot zoken gant ho tad hag ho mamm, ho preudeur, ho tud kar hag ho mignoned; darn ac'hanoc'h a vo lazhet. 17 Ha kasaet e vezot gant an holl en abeg d'am anv. 18 Met, blevenn ebet diwar ho penn ned aio da goll. 19 Dre ho talc'hegezh er boan e c'hounezot hoc'h eneoù.

20 «Pa welot avat Jeruzalem kelc'hiet gant armeoù, gouezit neuze emañ tost he dismantr. 21 Neuze ar re a vezo e Youdea, ra dec'hint d'ar menezioù; ar re a vezo e diabarzh kêr, ra bellaint diouti; hag ar re a vezo war ar maez, ra chomint hep distreiñ e kêr. 22 Rak deizioù a gastiz a vo an deizioù-se, ma vo kaset da wir kement a zo bet skrivet. 23 Gwa ar merc'hed a vezo o tougen pe o vegañ en deizioù-se; rak anken vras a vezo war an douar, ha kounnar enep ar bobl-mañ.

²⁴Kouezhañ a ray an dud dindan dremm ar c'hleze, pe gaset e vint da sklaved d'an holl vroadoù. Ha mac'het e vo Jeruzalem dindan dreid ar Broadoù betek ma vo peurgaset da benn amzer ar Broadoù.

²⁵ «Hag e vo arouezioù en heol, el loar hag er stered; ha war an douar enkreiz e-touez ar Broadoù gant ar souezhus ma vo trouz ar mor hag an tonnoù. ²⁶ An dud o tisec'hañ gant ar spont oc'h en em c'houlenn petra vo o tont war ar bed-holl, rak galloudegezhioù an neñvoù a vo brallet. ²⁷ Neuze e vo gwelet Mab an Den o tont war ur goabrenn, gant galloud ha klod vras.

²⁸ Pa stago an traoù-se da c'hoarvezout, adsavit ho kalon ha sonnit ho penn, rak tost e vo deoc'h bezañ tennet a boan.»

²⁹ Hag e lavaras dezho ur barabolenn : «Sellit ouzh ar wezenn-fiez, hag ouzh ar gwez all. ³⁰ Pa grogont da vountañ ec'h ouzit, diouzh o gwelout, emañ tost an hañv. ³¹ Evel-se, c'hwi ivez, pa welot kement-se o c'hoarvezout, gouezit emañ tost Rouantelezh Doue. ³² Ya, me lavar deoc'h, ne dremenno ket ar rummad-mañ, ken na zegouezho an holl draoù-se. ³³ An neñv hag an douar a dremenno, va c'homzoù-me avat ne dremenint ket. ³⁴ Diwallit ouzhoc'h hoc'h-unan, gant aon na ve pounneraet ho kalonoù gant an dirollerezh, ar vezventi ha prederioù ar vuhez-mañ, ha na gouezfe an deiz-se warnoc'h a-daol-trumm, ³⁵ evel ur roued; rak kouezhañ e ray war an holl dud a zo o chom war an douar a-bezh. ³⁶ Beilhit eta, en ur bediñ e pep amzer, ma vezot barrek da dec'hout diouzh an holl draoù-se da zont, ha da chom en ho sav dirak Mab an Den.»

³⁷ E-pad an deiz, e veze en Templ o kelenn; diouzh an noz ez ae er-maez, hag e chome war ar menez anvet Menez an Olived. ³⁸ Hag an holl dud a zeue beure-mat davetañ d'an Templ, evit e selaou.

Itrikoù an Arc'h-veleien.

22 ¹ Tostaat a rae Gouel ar Bara Dic'hoell a reer anezhañ ar Pask. ² Ha klask a rae ar Veleien Vras hag ar Skribed penaos e lakaat d'ar marv, rak aon o devoa rak ar bobl.

Trubarderezh Youdaz.

³ Neuze ec'h antreas Satan e Youdaz lesanvet Iskariot, hag a oa unan eus an Daouzek. ⁴ Mont a reas d'en em glevout gant an Arc'h-veleien ha pennoù bras ar Warded diwar-benn an tu d'e lakaat etre o daouarn. ⁵ Laouen bras e voent hag e tivizjont reiñ arc'hant dezhañ. ⁶ Asantiñ a reas ha klask a rae un degouezh mat evit e lakaat etre o daouarn, hep gouzout d'ar bobl.

Savidigezh Sakramant an Aoter.

⁷ Donet a reas eta deiz ar Bara Dic'hoell, ma tleer aberzhañ ar Pask. ⁸ Ha Jezuz a gasas Pêr ha Yann en ur lavarout dezho : «It da aozañ dimp ar Pask, m'en debrimp.»

⁹ Int a c'houlennas outañ : «Pelec'h e fell dit en aozfemp?» ¹⁰ Respont a reas : «Setu, pa vezot oc'h antren e kêr, en em gavo ganeoc'h un den o tougen ur podad dour; heuilhit-eñ betek an ti ma'z ay ennañ. ¹¹ Ha lavarout a reot da vestr an ti : Ar Mestr a c'houlenn ouzhit : Pelec'h emañ ar sal ma tebrin enni ar Pask gant va diskibien? ¹² Hag hennezh a ziskouezo deoc'h ur gambr war-laez, pallennet; aozit eno pep tra.» ¹³ Mont a reas eta an diskibien hag e kavjont an traoù evel m'en devoa lavaret dezho : hag aozañ a rejont ar Pask.

¹⁴ Ha pa voe deuet an eur, ez eas ouzh taol, hag e Ebestel gantañ. ¹⁵ Lavarout a reas dezho : «C'hoant bras am eus bet da zebriñ ar Pask-mañ ganeoc'h, kent din gouzañv. ¹⁶ Rak me lavar deoc'h, n'en debrin ken, betek ma vo bet sevenet en e leunder e Rouantelezh Doue.» ¹⁷ Hag o vezañ kemeret ur c'halir, e trugarekaas, en ur lavarout : «Kemerit kement-mañ, ha lodennit etrezoc'h. ¹⁸ Me lavar deoc'h, adalek bremañ, n'evin ken eus frouezh ar gwini, ken na vo deuet Rouantelezh Doue.» ¹⁹ Hag o vezañ kemeret bara, e lavaras ur bedenn a drugarez, en rannas hag en roas dezho en ur lavarout : «Kement-mañ eo va c'horf, an hini roet evidoc'h; grit an dra-mañ evit ober an eñvoradur ac'hanon.» ²⁰ Hag evel-se ivez, goude koan, e reas evit ar c'halir, en ur lavarout : «Ar c'haliriad-mañ eo an Emglev nevez em gwad, an hini skuilhet evidoc'h.»

Jezuz o reiñ keloù eus trubarderezh Youdaz.

²¹ «Setu avat m'emañ dorn an hini am gwerzh, ganin ouzh an daol-mañ. ²² Rak Mab an Den a ya evel m'eo bet divizet; mallozh avat d'an den-se ma'z eo gwerzhet gantañ.» ²³ Hag int en em lakaas da c'houlenn etrezo piv anezho a oa an hini o vont d'ober an dra-se.

An Ebestel o tabutal diwar-benn o renk.

²⁴ Tabut a savas ivez etrezo : Piv anezho a oa da vezañ sellet evel ar brasañ. ²⁵ Jezuz avat a lavaras dezho : «Rouaned ar broadoù a ra o mistri warno; hag ar re o deus galloud warno a fell dezho bezañ anvet madoberourien. ²⁶ C'hwi avat, arabat ober evel-se : hogen ar brasañ en ho touez ra vezo evel an hini yaouankañ, hag an hini a ren, evel an hini a servij. ²⁷ Piv eo ar brasañ? an hini a zo ouzh taol, pe an hini o servijañ? Daoust ha n'eo ket an hini a zo ouzh taol? Me avat, a zo en ho touez evel an hini o servijañ.

²⁸ Met c'hwi eo ar re a zo bepred chomet feal din em amprouadurioù; ²⁹ ha me neuze a fell din reiñ deoc'h galloud-roue evel m'en deus va Zad roet din, ³⁰ ma tebrot ha ma'z evot ouzh va zaol em Rouantelezh, ha ma vezot azezet war dronioù o varn daouzek meuriad Israel.

Jezuz o tiouganañ dianzavadur Pêr, hag ar gwall reuz evit ar re all.

³¹ Simon, Simon, setu m'en deus Satan bet e c'houlenn d'ho kroueriañ evel ar gwinizh; ³² hogen me am eus pedet evidout, evit na semplo ket da feiz; ha te, pa vi distroet, starta da vreudeur.» ³³ Met eñ a respontas dezhañ : «Aotrou, ganit ez on prest da vont ha d'ar prizon ha d'ar marv.» ³⁴ Hogen Jezuz a lavaras dezhañ : «Me lavar dit, Pêr, n'en devo ket kanet ar c'hilhog hiziv m'az po dre deir gwezh nac'het va anavezout.»

³⁵ Hag e lavaras c'hoazh dezho : «P'em eus ho kaset hep yalc'h na sac'h, na botoù, daoust ha diouer hoc'h eus bet eus un dra bennak?» - «Eus netra !» emezo - ³⁶ «Met bremañ, emezañ, an neb en deus ur yalc'h, r' he c'hemero, hag ur sac'h kerkoulz all; hag an neb n'en deus ket a gleze, ra werzho e vantell da brenañ unan. ³⁷ Rak me lavar deoc'h, e tle donet da wir ennon al lavar-mañ eus ar Skritur : Lakaet eo bet e renk an dorfedourien. E gwirionez, kement a sell ouzhin-me a zo tost d'e dermen.»

³⁸ «Aotrou, emezo, sed amañ daou gleze !» Hag e respontas dezho : «Tra-walc'h eo !»

War Venez an Olived. Gwall-anken Jezuz.

³⁹ O vezañ aet er-maez, e tennas, evel e gustum, war-zu Menez an Olived, ha war e lerc'h e teue e ziskibien. ⁴⁰ Pa voe erru el lec'h-se, e lavaras dezho : «Pedit gant aon da vont e-barzh an temptadur.» ⁴¹ Pellaat a reas diouto war-hed un taol-maen, hag o vezañ aet war e zaoulin, e pede, ⁴² en ur lavarout : «Tad, ma fell dit, kas ar c'haliriad-mañ diouzhin; koulskoude, ra vo graet n'eo ket va youl, met da hini-te.» ⁴³ Neuze en em ziskouezas dezhañ un Ael eus an Neñv d'e gennerzhañ. ⁴⁴ Ha kouezhet en enkreiz brasañ, e pede gredusoc'h; hag e teuas e c'hwezenn warnañ da vezañ evel takennoù gwad hag a zivere war an douar. ⁴⁵ Sevel a reas diouzh e bedenn evit mont davet e ziskibien, met o c'haout a reas kousket gant an dristidigezh. ⁴⁶ Hag e lavaras dezho : «Perak e kouskit-hu? Savit ha pedit da chom hep mont e-barzh an temptadur.»

Jezuz paket.

⁴⁷ Edo c'hoazh o komz, paz erruas ur bagad tud, hag an hini anvet Youdaz, unan eus an Daouzek, er penn anezho. Tostaat a reas ouzh Jezuz da boket dezhañ. ⁴⁸ Jezuz a lavaras dezhañ : «Youdaz, gant ur pok eta e werzhez Mab an Den?» ⁴⁹ «welout ar pezh a oa da vezañ ar re a oa gantañ a lavaras dezhañ : «Aotrou, ha ma skofemp gant ar c'hleze?» ⁵⁰ Hag unan anezho o skeiñ gant mevel ar Beleg-Meur a droc'has dezhañ e skouarn dehoù. ⁵¹ Met Jezuz o komz a lavaras : «Lezit da vont ! » Hag o vezañ stoket ouzh skouarn an den, eñ pareas.

⁵² Neuze e lavaras Jezuz d'ar re a oa deuet a-enep dezhañ, pennbeleien, pennoù bras gwarded an Templ, hag Henaourien : «Evel pa vefen ul laer, oc'h deuet a-enep din gant klezeier ha bizhier. ⁵³ P'edon bemdez en ho touez, en Templ, n'hoc'h eus ket astennet ho taouarn warnon; met bremañ emañ ho koulz, ha mestroni an deñvalijenn.»

Teir nac'hadenn Bêr.

⁵⁴ Neuze o kregiñ ennañ er c'hasjont da di ar Beleg-Meur. Pêr a heulie eus a bell. ⁵⁵ Evel m'o devoa graet tan e-kreiz ar porzh hag e oant aet d'azezañ en-dro dezhañ, en em lakaas Pêr en e goazez en o zouez. ⁵⁶ Met ur vatezh o vezañ e welet azezet ouzh flamm an tan, hag o sellout pizh outañ, a lavaras : «Hemañ ivez a oa gantañ !» ⁵⁷ Nac'hañ a reas avat : «Maouez, n'en anavezan ket.» ⁵⁸ Nebeut goude, un all en gwelas hag a lavaras : «Te ivez a zo unan anezho.» Met Pêr a lavaras : «Va den mat, ned on ket.» ⁵⁹ War-dro un eur goude, unan all a lavare groñs : «Sur-mat, hemañ ivez a oa gantañ; sellit 'ta, Galilead eo !» ⁶⁰ «Va den mat, eme Bêr, ne ouzon ket petra a lavarez.» D'an ampoent, p'edo c'hoazh o komz, e kanas ur c'hilhog. ⁶¹ Hag an Aotrou, o vezañ distroet, a baras e sell war Bêr. Ha neuze e teuas da soñj da Bêr eus gêr an Aotrou p'en devoa lavaret dezhañ : «A-raok d'ar c'hilhog kanañ hiziv, az po va nac'het teir gwezh.» ⁶² Hag o vont er-maez e skuilhas daerou c'hwerv.

Jezuz dismegañset.

⁶³ Hogen ar wazed hag a oa o terc'hel Jezuz, a rae goap anezhañ, hag en gwallgase. ⁶⁴ Mouchañ a raent e zremm hag e c'houlennet : «Gra da ziouganer ! Piv en deus skoet ganit?» ⁶⁵ Ha kalz a wall-gomzoù all a zistagent a-enep dezhañ.

Jezuz dirak ar C'huzul Bras.

⁶⁶ Pa c'houlouas an deiz, en em vodas kuzul Re Gozh ar bobl, Priñsed ar veleien, ha Skribed Degas a rejont Jezuz dirak o lez-varn, ⁶⁷ hag e lavarjont dezhañ : «Mard-out ar C'hrist, lavar dimp ! » Hag eñ a respontas dezho : «Mar lavaran deoc'h, n'am c'hredot ket, ⁶⁸ ha ma ran-me goulennou ouzhoc'h, ne respontot ket. ⁶⁹ Met diwar vremañ e vo Mab an Den azezet en tu dehoù da c'halloud Doue.» ⁷⁰ Ma lavarjont holl neuze : «Te eo Mab Doue eta?»

Hag e tisklêrias dezho : «C'hwi a lavar mat, me eo !» ⁷¹ Neuze e lavarjont : «Da betra hon eus c'hoazh ezhomm testeni? Ni hon-unan hon eus e glevet eus e c'henou.»

Jezuz dirak Pilat evit ar wezh kentañ.

23 ¹ Holl dud an emvod a savas neuze; hag e gas a rejont da Bilat. ² En em lakaat a rejont d'e damall evel-henn : «Hemañ hon eus kavet o lakaat reveulzi e-touez hor pobl, hag o virout a baeañ ar gwirioù da Gaesar, hag o tisklêriañ ez eo eñ ar C'hrist Roue.» ³ Neuze Pilat a c'houlennas digantañ : «Te eo roue ar Yuzevien?» Respont a reas outañ : «En lavarout a rez.» ⁴ Ha Pilat a zisklêrias d'ar veleien-vras ha d'ar bobl : «Ne gavan netra tamallus en den-se.» ⁵ Met i a zalc'he gant nerzh da lavarout : «Lakaat a ra ar bobl d'en em sevel en ur gelenn dre Youdea a-bezh, adalek Bro-C'halilea 'lec'h m'eo kroget, betek amañ.» ⁶ War ar c'homzoù-se e c'houlennas Pilat ha Galilead e oa an den-se. ⁷ Ha pa ouezas edo eus dalc'h Herodez, er c'hasas da Herodez hag en em gave ivez e Jeruzalem en deizioù-se.

Jezuz dirak Herodez.

⁸ Herodez, pa welas Jezuz, a voe laouen-bras, rak abaoe pell amzer en deveze c'hoant d'e welout, gant ar pezh a gleve diwar e benn, ha spi a-walc'h en devoa d'e welout oc'h ober ur burzhud bennak. ⁹ En goulennata a reas gant forzh gerioù, met Jezuz ne respontas netra dezhañ. ¹⁰ Eno koulskoude edo ar Veleien-Vras, hag ar Skribed hag en tamalle gant taerijenn. ¹¹ Herodez hag e warded eta, goude bezañ graet fae warnañ, ha graet goap anezhañ, a wiskas dezhañ ur sae splann-meurbet, hag er c'hasas en-dro da Bilat. ¹² Adalek an deiz-se, e teuas Pilat hag Herodez da vezañ mignonned, eus a enebourien ma oant diagent.

Jezuz a-nevez dirak Pilat. Jezuz ha Barabbas.

¹³ Pilat eta goude bezañ galvet an Arc'h-veleien, ar pennadurezhioù hag ar bobl, ¹⁴ a lavaras dezho : «Degaset hoc'h eus din an den-mañ, evel unan o tougen ar bobl d'ar reveulzi; ha setu m'em eus dirazoc'h graet enklask diwar-benn se, ha n'em eus kavet ennañ netra da damall eus ar pezh a lavarit en e enep. ¹⁵ Nag Herodez kennebeut, peogwir en deus en adkaset dimp en-dro. Gwelout a rit, mann ebet n'en deus graet hemañ a gement a dalvezfe ar marv. ¹⁶ Rak-se, goude bezañ e gastizet, en laoskin da vont.» ¹⁷ (Hogen da geñver ar Gouel e tlee reiñ dezho frankiz ur prizoniad) ¹⁸ Met holl en em lakajont da grial a-gevret : «Ar marv evit hemañ, ha laosk ganimp Barabbas.» ¹⁹ Hemañ a oa bet taolet er prizon, evit un taol-dispac'h c'hoarvezet e kêr, hag ur muntr. ²⁰ Pilat eta, c'hoant gantañ da leuskel Jezuz, a gomzas outo adarre. ²¹ Int avat a grie : «Ar groaz ! Ar groaz dezhañ !» ²² Evit an trede gwezh e lavaras dezho : «Pe zroug eta en deus graet an den-mañ? Netra n'am eus kavet ennañ a gement a dalvezfe ar marv. Mont a ran eta d'e gastizañ ha d'e leuskel da vont.» ²³ Int avat a zalc'h start gant kriadegoù bras da c'houlenn ma vije staget ouzh ar groaz,

ha gwashoc'h-gwashañ e save o mouezhioù. ²⁴ Pilat neuze a varnas ma vefe roet o mennad dezho. ²⁵ Ha leuskel a reas ganto an hini a oa bet taolet er prizon evit un taol-dispac'h hag ur muntr, an hini a c'houlennet; Jezuz avat, e reiñ a reas dezho hervez o youl.

Hent ar C'halvar ha Merc'hed Jeruzalem.

²⁶ Pa oant ouzh e gas ganto e taoljont o dorn war un den, Simon ar C'hurenead, a oa o tont eus ar park, hag e sammjont ar groaz warnañ evit he dougen war-lerc'h Jezuz. ²⁷ Ur bobl vras a dud en heulie, ha merc'hed hag a skoe war boull o c'halon hag a hirvoude warnañ. ²⁸ O treiñ outo Jezuz a lavaras : «Merc'hed Jeruzalem, na ouelit ket warnon, kentoc'h gouelit warnoc'h ha war ho pugale. ²⁹ Rak setu o tont deizioù ma vo lavaret : «Eürus ar gwragez divugel, an daou-gostezioù n'o deus ket douget hag an divronnoù n'o deus ket maget. ³⁰ Neuze en em lakaint *da lavarout d'ar menezioù : Kouezhit warnomp ! ha d'an torgennoù : Kuzhit-ni !* ³¹ Rak ma reer evel-henn d'ar c'hoad glas, petra a c'hoarvezo gant ar c'hoad sec'h?»

³² Daou dorfedour all a gased c'hoazh, evit bezañ lakaet d'ar marv war un dro gantañ.

Jezuz staget ouzh ar groaz.

³³ Pa voent erruet el lec'h anvet Kalvar, en stagjont ouzh ar groaz eno, hag an dorfedourien ivez, unan en tu dehoù hag egile en tu kleiz. ³⁴ Jezuz a lavare : «Tad, pardon dezho, rak n'ouzont ket petra a reont.»

Goapaerezh ar Yuzevien. Al laer mat hag al laer fall.

Neuze o *rannañ e zilhad, e tennjont ar sord warno*. ³⁵ Ar bobl a chome eno da sellout. Ar pennoù-bras, int ivez, a rae goap anezhañ en ur lavarout : «Salvet en deus reoù all; ra 'n em salvo e-unan, mard eo Krist Doue, an hini dibabet !» ³⁶ Ar soudarded ivez a c'hoarzhe goap warnañ; tostaat a raent hag e kinnigent gwinegr dezhañ, ³⁷ en ur lavarout : «Mard-out Roue ar Yuzevien, en em salv da-unan.» ³⁸ Bez' e oa ivez ur skrid a-us d'e benn : «Hemañ eo roue ar Yuzevien.»

³⁹ Unan eus an dorfedourien e pign ouzh ar groaz, a skoe kunujennoù gantañ, en ur lavarout : «Ha n'eo ket te eo ar C'hrist? En em salv da-unan ha ni ganit.» ⁴⁰ Met egile a respontas outañ gant komzoù taer : «Na te, kennebeut-all, n'ec'h eus tamm ebet doujañs Doue, goude m'out bet barnet d'an hevelep kastiz? ⁴¹ Evidomp-ni ez eo reizh, gopret omp diouzh hon torfedoù; met hemañ n'en deus graet droug ebet.» ⁴² Hag e lavare : «Jezuz, az pezh soñj ac'hanon pa zeui e gloar da Rouantelezh.» ⁴³ Ha Jezuz a respontas dezhañ : «E gwirionez, en lavarout a ran dit, hiziv e vi ganin er Baradoz.»

Jezuz a varv ouzh ar groaz.

⁴⁴ War-dro ar c'hwec'hvet eur e oa pa zeuas teñvalijenn war ar vro a-bezh betek an navet eur, an heol o vezañ kuzhet; ⁴⁵ ha gouel an Templ a rogas dre an hanter ⁴⁶ Jezuz o c'harmiñ en ur griadenn vras a lavaras : «Tad, etre da zaouarn e lakaan va spered.» Hag o lavarout kement-se, e laoskas e huanad diwezhañ.

⁴⁷ Pa welas ar c'hantener ar pezh a oa c'hoarvezet, e tougas klod da Zoue, gant ar c'homzoù-mañ : «E gwirionez, an den-mañ a oa un den reizh.» ⁴⁸ Hag an holl engroezioù tud hag

a oa en em zastumet evit gwelout an arvest-se, pa weljont petra a oa en em gavet, a yae war o c'hiz, o skeiñ war boull o c'halon.

Jezuz beziet.

⁴⁹ Holl dud e anaoudegezh en em zalc'he a-ziabell, hag ivez ar gwrazez o devoa en heuliet adalek Galilea, hag a selle ouzh an traoù-se.

⁵⁰ Ha setu neuze un den anvet Jozef, ezel eus ar C'huzul bras, un den mat ha reizh: ⁵¹ henezh n'en devoa ket asantet na d'o mennad, na d'o oberoù; genidik eus Arimatea, ur gêr eus ar Yuzevien, a c'hortoze Rouantelezh Doue, ⁵² hemañ a yeas da gaout Pilat evit goulenn korf Jezuz. ⁵³ E diskenn a reas diouzh ar groaz, e c'hronnañ en ul liñsel hag e lakaat en ur bez kleuzet er roc'h lec'h na oa bet lakaet c'hoazh den ebet. ⁵⁴ Deiz ar Ragaozadur e oa, hag e lugerne dija goulouennoù ar sabad. ⁵⁵ Ar gwrazez hag a oa deuet gant Jezuz eus Galilea o devoa heuliet a-dost; sellout mat a rejont ouzh ar bez ha penaos e oa bet lakaet korf Jezuz. ⁵⁶ Hag o vezañ distroet war o c'hiz, ec'h aozjont louzeier a c'hwezh-vat ha frondoù. Ha deiz ar sabad, e talc'hjont d'an diskuizhadenn gourc'hemennet.

Ar bez goull.

24 ¹ An deiz kentañ eus ar sizhun, gant tarzhe kentañ an deiz, e teujont d'ar bez ha ganto al louzeier c'hwezh-vat o devoa aozet. ² Ar maen a gavjont ruilhet a-zirak ar bez. ³ O vezañ aet e-barzh, ne gavjont ket korf an Aotrou Jezuz. ⁴ Nec'het e oant diwar e benn, pa en em ziskouezas dezho daou zen gant dilhad lugernus. ⁵ Evel ma oant spontet ha ma plegent o dremm war-zu an douar, ar re-mañ a lavaras dezho : «Perak e klaskit e-touez ar re varv an hini a zo bev? ⁶ N'emañ ket amañ; dihunet eo a-douez ar re varv. Ho pet soñj penaos en deus komzet ouzhoc'h p'edo c'hoazh e Galilea, pa lavare : ⁷ «Ret eo da Vab an Den bezañ lakaet etre daouarn ar bec'herien, bezañ staget ouzh ar groaz, ha d'an trede deiz adsevel.»

⁸ Neuze e teuas soñj dezho eus e gomzoù.

Diskred an Ebestel. Pêr er bez.

⁹ O tont en-dro eus ar bez, e tegemennjont an holl draoù-se d'an Unnek ha d'an holl reoù all. ¹⁰ Bez' e oa anezho Mari-Madalen, Yoanna, ha Mari, mamm Jakez; ar merc'hed all hag a oa ganto a gontas kement-se ivez d'an Ebestel. ¹¹ Met ar c'homzoù-se a seblantas dezho bezañ sorc'hennoù, ha ne gredjont ket ar merc'hed. ¹² Pêr koulskoude a savas hag a redas d'ar bez; hag o vezañ soublet e benn, ne welas nemet ar bandennoù, hag e tistroas d'ar gêr, souezhet gant ar pezh a oa c'hoarvezet.

Jezuz ha daou ziskibl Emmaus.

¹³ En deiz-se, setu ma oa daou anezho o vont d'ur vourc'h war-hed tri-ugent stadenn diouzh Jeruzalem, hec'h anv Emmaus, ¹⁴ hag e komzent etrezo diwar-benn kement tra a oa c'hoarvezet. ¹⁵ Ha setu e-pad ma oant o komz hag o vreutaat, Jezuz e-unan a dostaas hag en em lakaas d'ober hent ganto; ¹⁶ met dalc'het e oa o daoulagad ma ne oant ket evit e anavezout. ¹⁷ Hag e lavaras dezho : «Petra eo ar c'homzoù-se a lavarit an eil d'egile, en ur vont gant an hent?» Chom a rejont a-sav,

leun a dristidigezh. ¹⁸Unan anezho, anvet Kleopaz, a respontas dezhañ : «Te eo an estren nemetañ, o chom e Jeruzalem, a vefe hep gouzout petra a zo bet c'hoarvezet enni, en deizioù-mañ?» - ¹⁹«Petra 'ta?» emezañ. Ar re-mañ a respontas : «Ar pezh a zo en em gavet gant Jezuz a Nazared, a oa en em ziskouezet evel ur profed galloudus en e oberoù hag en e gomzoù, dirak Doue ha dirak ar bobl a-bezh; ²⁰ha penaos o deus hor beleien vras hag hor pennadurezhioù en droukroet da vezañ barnet d'ar marv, hag eñ staget ouzh ar groaz. ²¹Ni avat a c'hoanage e oa hennezh an hini a zasprenfe Israel; hogen, gant kement-se holl, eo hemañ an trede deiz abaoe m'eo degouezhet an traoù-se. ²²Gwir eo ez eo bet strafuilhet hor spered gant un nebeut gwraez eus hon touez : aet int d'ar bez da c'houlou-deiz, ²³ha pa n'o deus ket kavet e gorf, ez int distroet en ur lavarout o devoa gwelet Aeled zoken, hag a lavar ez eo bev. ²⁴Ha darn eus hor c'hompagnuned a zo aet d'ar bez, hag o deus ivez kavet an traoù evel m'o devoa lavaret ar gwraez; eñ avat n'o deus ket eñ welet.»

²⁵Neuze e lavaras dezho : «O tud dispered ha gorrek ho kalonù da grediñ kement o deus lavaret ar Brofeded ! ²⁶Daoust ha ne oa ket ret d' ar C'hrist gouzañv ar poanioù-se ha mont evel-se en e c'hloar?» ²⁷Hag o kregiñ gant Moizez hag an holl Brofeded, e tisleugas dezho, en holl Skriturioù, ar pezh a oa diwar e benn. ²⁸Evel-se ec'h errujont tost d'ar vourc'h ma'z aent, met eñ a reas van da vont hiroc'h. ²⁹Met derc'hel a rejont warnañ en ur lavarout : «Chom ganimp, rak setu ar serr-noz o tont, hag emañ an deiz o tiskenn.» Hag ec'h antreas eta evit chom ganto. ³⁰Hag e c'hoarvezas pa oa ouzh taol ganto, ma kemeras ha ma vennigas ar bara, m'en rannas ha m'en roas dezho. ³¹Neuze o daoulagad a zigoras hag e anavezout a rejont; eñ avat a oa en em guzhet diouto. ³²Hag e lavarjont an eil d'egile : «Daoust ha ne verve ket hor c'halon en hor c'hreiz, pa gomze ouzhimp war an hent, ha pa zizoloe dimp ar Skriturioù?» ³³Hag o sevel raktal e tistrojont da Jeruzalem. Eno e kavjont bodet an Unnek hag o c'hompagnuned, ³⁴a lavaras dezho : «Evit gwir, dasorc'het eo an Aotrou, hag en em ziskouezet eo da Simon.» ³⁵Hag i o-unan a zisplegas ar pezh a oa c'hoarvezet war an hent, ha penaos o devoa hen anavezet gant rannidigezh ar bara.

Jezuz oc'h en em ziskouez d'an Ebestel ha d'an Diskibien, noz e zasorc'h.

³⁶O komz evel-se e oant paz en em gavas Jezuz en o c'hreiz, ha ma lavaras dezho : «Ar peoc'h ra vo ganeoc'h.» ³⁷Sabatuet ha spontet ma oant, e krede dezho gwelout ur spered. ³⁸Hag e lavaras dezho : «Perak ez oc'h strafuilhet, ha perak e sav diskred en ho kalonù? ³⁹Sellit ouzh va daouarn hag ouzh va zreid; me eo, me va-unan. Stokit ouzhin ha gwelit; ur spered n'en deus na kig nag eskern, evel ma welit am eus-me !» ⁴⁰En ur lavarout kement-se, e tiskouezas dezho e zaouarn hag e dreid. ⁴¹Met evel ma choment c'hoazh amgredik, en o levez, sebezet ma oant, e lavaras dezho : «Hag-eñ hoc'h eus-hu amañ un dra bennak da zebriñ?» ⁴²Kinnig a rejont dezhañ un tamm pesk rostet. ⁴³E gemer hag e zebriñ a reas dirazo.

Kemenoù diwezhañ Jezuz.

⁴⁴Hag e lavaras dezho : «Setu aze end-eeun ar pezh am boa lavaret deoc'h, pa oan c'hoazh ganeoc'h, penaos e oa ret e vefe sevenet kement a zo bet skrivet diwar va fenn, e Lezenn Voizez hag er Brofeded, hag er Salmoù.» ⁴⁵Neuze e tigoras o spered da gompren ar Skriturioù. ⁴⁶Hag e lavaras dezho : «Evel-se ez eo skrivet e rankfe ar C'hrist gouzañv hag adsevel a-douez ar re varv d'an trede deiz; ⁴⁷hag e vefe embannet en e anv an distro a spered evit pardon ar pec'hedoù, d'an holl bobloù en ur gregiñ dre Jeruzalem. ⁴⁸C'hwi eo an testoù eus an traoù-se.

⁴⁹ Me avat, setu ma'z an da zegas deoc'h Grataerezh va Zad. Chomit e kêr, ken na vezot gwisket gant ar galloud eus an nec'h.»

⁵⁰ O degas a reas betek e-kichen Betania, hag o vezañ savet e zaouarn, en o bennigas.

⁵¹ Hag e-pad ma oa ouzh o bennigañ ec'h en em zispartias diouto hag e voe douget d'an Neñv. ⁵² Hag int, goude bezañ stouet dirazañ d'e azeuliñ, a zistroas da Jeruzalem, gant levez vras, ⁵³ hag e vezent dalc'hmat en Templ, o veuliñ hag o vennigañ Doue.

TAOLENN

An Aviel hervez Lukaz.....	1
1 Kinnigadur.....	2
Ganedigezh Yann Vadezour degemennet da Zakaria.....	2
An Arc'hael Gabriel o tegemenn ganedigezh Jezuz.....	2
Gweladenn Vari da Elizabed.....	3
Ganedigezh Yann.....	3
Kantik Zakaria.....	4
Ganedigezh Jezuz e Betlehem.....	4
Jezuz amdroc'het ha kinniget en Templ.....	5
Jezuz kollet hag adkavet.....	6
Prezegerezh Yann.....	6
Badeziant Jezuz.....	7
Lignez Jezuz.....	7
Jezuz temptet er gouelec'h.....	7
Jezuz a stag da brezeg.....	8
Jezuz e Nazared.....	8
Jezuz o prezeg hag o parañ tud e Kafarnaoum.....	9
Pesketaerezh burzhudus.....	9
Un den lovr pareet.....	9
Un den seizet pareet.....	10
Galvidigezh Levi. Tabut war ar yun.....	10
Pennoù-ed diframmet un deiz - sabad.....	10
Un den disec'het e zorn hag ar sabad.....	11
Dilenn an Daouzek.....	11
An engroezioù-tud en-dro da Jezuz.....	11
Gwenvidigezhioù ha mallozhioù.....	11
Karantez ha truez ouzh an enebourien.....	12
Mestr ha diskibl.....	12
Ar wezenn vat hag ar wezenn fall.....	12
Ober diouzh an Aviel eo ar pezh a zo ret.....	12
Pare mevel kantener Kafarnaoum.....	12
Dasorc'h mab intañvez Naim.....	13
Ar gannaded a-berzh Yann.....	13
Yann meulet gant Jezuz.....	13
Jezuz hag ar bec'herez keuzidik.....	14
Gwragez santel o heuliañ Jezuz.....	14
Parabolenn an hader.....	14
Parabolenn al lamp.....	15
Kerent Jezuz hervez ar gwad hag hervez ar spered.....	15
Ar gorventenn sioulaet.....	15
Den diaoulek Gerasa.....	15
Ar vaouez gant an diwadañ. Merc'h Jairoz.....	16
Prezegerezh an Ebestel.....	16
Nec'h Herodez.....	16
Ar bara kresket.....	17
Pêr a zisklêr e feiz. Diougan kentañ ar Basion.....	17
An emnac'h da c'hounit ar Rouantelezh.....	17

Treuzneuziadur Jezuz.....	17
Pare ar bugel diaoulek.....	18
Tabut war ar vestroniezh.....	18
Jezuz o vont da Jeruzalem. Samaridi a nac'h en degemerout.....	18
Galvidigezh d'an emziouer.....	18
Mision an daouzek diskibl ha tri-ugent.....	18
Distro an daouzek diskibl ha tri-ugent.....	19
An Aviel diskuliet d'an dud eeun.....	19
Parabolenn ar Samaritan mat.....	19
Marta ha Maria.....	20
Ar Bater.....	20
Parabolenn ar mignon hegazus.....	20
Nerzh ar bedenn.....	20
Rouantelezh an Neñv a zo enebiezh ouzh an diaoul.....	20
Arouez Yonas.....	21
Parabolenn ar gouloù.....	21
Jezuz o kondaoniñ ar Farizianed ha Doktored an Lezenn.....	21
Goell ar Farizianed.....	22
Disklêriañ dispont e feiz.....	22
Ar pec'hed enep ar Spered Santel.....	22
Skoazell ar Spered Santel en heskinerezh.....	22
Madoù an douar ha buhez an neñv.....	22
Lakaat e fiziañs e Doue. Klask da gentañ Rouantelezh an Neñv.....	23
Bezañ war evezh.....	23
Parabolenn ar merour.....	23
An tan hag ar brezel degaset gant Jezuz.....	23
Arouezioù an amzerioù.....	24
Diwar-benn ar varn.....	24
Ober pinijenn. Parabolenn ar fiezenn difrouezh.....	24
Un deiz sabad e yac'ha Jezuz ur vaouez daoubleget.....	24
Parabolenn ar c'hreunenn sezo.....	24
Parabolenn ar goell.....	25
Jezuz o vont war-zu Jeruzalem; Ar Yuzevien distaolet. Ar Baganed salvet.....	25
Jezuz a heuilh e hent hep aon rak Herodez.....	25
Diwar-benn Jeruzalem : Diskar Jeruzalem.....	25
Un den dourgoeñvet yac'haet un deiz sabad.....	25
Kentel war an izelegezh.....	25
Ober vad d'ar re n'hellont ket reiñ digoll en-dro.....	26
Ar goan vras.....	26
Evit heuliañ Jezuz e tle an den en em nac'h e-unan.....	26
Levenez an neñv evit distro ar bec'herien.....	27
An dañvad dianket.....	27
An drakm ezaouet.....	27
Ar mab dispigner.....	27
Ar merour displeal.....	28
A-enep ar Farizianed : Reizhder Doue hag hini an dud.....	28
Parabolenn an den pinvidik hag ar paour Lazar.....	28
An droukskouer d'ar vugale.....	29
An em-reizhañ etre breudeur.....	29
Nerzh ar feiz.....	29

Servijañ gant izelder a galon.....	29
An dek den lovr.....	29
Donedigezh Rouantelezh Doue. Donedigezh Mab an Den.....	29
Ar barner displeal hag an intañvez.....	30
Ar Farizian hag ar Publikan.....	30
Jezuz o vennigañ ar vugaligoù.....	30
Riskl ar binvidigezh.....	31
Evit an trede gwezh e tiougan Jezuz e Basion.....	31
Den dall Yeriko.....	31
E ti an tailhanter Zake.....	31
Parabolenn ar minennoù.....	32
Jezuz oc'h antren e Jeruzalem, evel ur roue.....	32
Jezuz o ouelañ war Jeruzalem.....	33
Jezuz oc'h argas ar varc'hadourien eus an Templ.....	33
Ur goulenn ouzh Jezuz diwar-benn ar vestroniezh.....	33
Parabolenn ar winierien vuntrerien.....	33
Truj dleet da Gaesar.....	34
Sadukeidi ha dasorc'h ar c'horfoù.....	34
Ar Mesiaz a zo mab da Zavid hag e Aotrou.....	34
Jezuz o tamall d'ar Skribed o falsentez.....	34
Prof an intañvez paour.....	34
Diskar Jeruzalem hag an eil donedigezh.....	35
Itrikoù an Arc'h-veleien.....	36
Trubarderezh Youdaz.....	36
Savidigezh Sakramant an Aoter.....	36
Jezuz o reiñ keloù eus trubarderezh Youdaz.....	36
An Ebestel o tabutal diwar-benn o renk.....	36
Jezuz o tiouganañ dianzavadur Pêr, hag ar gwall reuz evit ar re all.....	37
War Venez an Olived. Gwall-anken Jezuz.....	37
Jezuz paket.....	37
Teir nac'hadenn Bêr.....	37
Jezuz dismegañset.....	38
Jezuz dirak ar C'huzul Bras.....	38
Jezuz dirak Pilat evit ar wezh kentañ.....	38
Jezuz dirak Herodez.....	38
Jezuz a-nevez dirak Pilat. Jezuz ha Barabbas.....	38
Hent ar C'halvar ha Merc'hed Jeruzalem.....	39
Jezuz staget ouzh ar groaz.....	39
Goapaerezh ar Yuzevien. Al laer mat hag al laer fall.....	39
Jezuz a varv ouzh ar groaz.....	39
Jezuz beziet.....	40
Ar bez goullo.....	40
Diskred an Ebestel. Pêr er bez.....	40
Jezuz ha daou ziskibl Emmaus.....	40
Jezuz oc'h en em ziskouez d'an Ebestel ha d'an Diskibien, noz e zasorc'h.....	41
Kemennoù diwezhañ Jezuz.....	41